

imbourc'h



KELAOUENN A STUDI

Niverenn 147

1982

31 Meurzh 1982

IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Trizekvet bloavezh

31 Meurzh 1982

Niverenn 147

Notennoù politikel.....P.117
Ster hengounel an tresolwezadur,gant Jil Ewanp.141
KELC'H KELTIEK ROAZHON, gant Herve Lanndiern,p.156
"Cennad Catholig Cymru" gant J. Chardronnet, p.160
"Diwar bennaouiñ", gant Kozharzh.....p.164
A-dreuz-lenn,.....P.165

oo

Koumanant-bloaz : 70 lur. KRP : 1534 25 N Roazhon,
Y. Ollivier. E miz Genver e krog ar c'houmanantoù
ha reiñ a reont ar gwir da zegemer ar stagadennoù
da zibab ar re a garfed prenañ.

Priz an niverenn-mañ : 10 lur.

Ar pennadoù a zo dagas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-
Burloud, 35 000 Roazhon.

=====

Niverenn-wask : 50 015

A-benn miz e tevio er-maez SJN AN TEMPL
troet gant Maodez Glanndour.

Spi hon eus e c'hellimp kas d'ar gouma-
nanterion stagadenn gentañ ar bloavezh-
mañ a-benn teir sizhun bennak. Bez' e vo
anezhi ur romant gant Youenn Olier :
PORZH AN JFERN, - unoberenn a 320 pajenn
bennak. Ar priz anezhi a zo : 50 lur
evit ar goumanaterion. Anaoudek e vefemp
ouzh hol lennerion ma c'hellfent prenañ
an oberenn-mañ. O vezañ ma kresk bep
bloaz priz ar bevañ e teu diaesoc'h-
diaesañ d'ar c'helaouennoù brezhonek
skoulmañ ganti, ha dreist-holl d'hor
c'helaouenn ha n'he deus bet nemet 150
koumananter bennak warlene hep gellout
embann stagadenn ebet, ken ez eo sammet
gant an dleoù er mare-mañ. Salv ma klas-
ko hol lennerion harpañ ar gelaouenn o
prenañ hec'h embannadurioù da vihanañ.

Ur roll a-ziforc'h a-grenn he deus
JMBOURC'H en emsav ha rak-se ivez e tle
bezañ skoazellet a-zevri gant an holl re
a zo prederiet gant dazont hor broad hag
he yezh.

BARZHONEGOU

gant I. MORVAN

OAN IWERZHON

Bobby, Oan Iwerzhon,
Da blanedenn oa
Bezañ aberzhet war aoter Eriu*.
N'eo ket te az poa divizet se :
An Hini Holl-c'halloudek, ne laran ket.
Bobby, oan Doue,
Me ' dlefe bezañ breur dit
Ha bezañ ganet eveldout
War douar sakr Iwerzhon.
Bobby, oan divlam,
Repoz en peoc'h bremañ
Er baradoz.

8 genver 1982

*Eriu pe Eire : Iwerzhon

SUB TEGMINE FAGI*

Sub tegmine fagi :
E disheol ar wezenn faou,
Deus, Spered Santel,
Deus e-barzh kalonoù an dud fidel ;
Lak enno tan da garantez,
Te hag a vod ar pobloù
A bep gouenn hag a bep yezh,
Sub tegmine fagi.

15 Genver 1982

*gerioù latin :
E disheol ar wezenn faou.

NOTENNOU POLITIKEL

Red an Emsav

Ret eo anzav ez eo morgousket an emsav e Breizh ha ne c'hoarvez ket kalz tra ennañ er mare-mañ. Abaoe meur a viz, da skouer, ne oa ket deuet er-maez POBL VREIZH. Evezhiet hor boa ouzh kement-se ha lavaret hor boa e oa kiriek da se moarvat an diouer a goumamanterion hag a lennerion ha n'oant ket gouest da zigoll mizoù-moulañ ar gelaouenn; marteze ivez an diouer a skrivagnerion. Er c'heñver-se, dav eo anzav, e talc'h gwelloc'h kelaouenn S.A.E. "BREMAÑ". Moarvat o deus gouezet atebeion ar gelaouenn-mañ espern ar mizoù o sevel o-unan ar vaketenn, da skouer, ha da gentañ o kas da benn o-unan ivez al lizherennaouadur. Ahend-all, pezh a zo mat er gazetenn-mañ, eo liesseurtiezh ar pennadoù ; stank a-walc'h eo ar skrivagnerion ; un oberenn a-stroll eo BREMAÑ ivez, gant ur skipailh re yaouank. Ouzhpennomp ez eo kempennet brav ar gelaouenn dre vras, gant skeudennoù hag ur pajennaouadur plijus d'al lagad. Evit an danvez, tennañ a ra dreist-holl, eveljust, d'ar stourm evit ar yezh (panelloù-hentañ, niveridigezh, aotreegezh, DIWAN h.a.) pe d'ar stourm amvevadour pui pe vui kleizelour ; ha reiñ a reer keloù, da

skouer, diwar-benn un "Talbenn sevenadurel Araokour" en Elzas. D'hor soñj n'eus diazez meizel hollek ebet d'an temoù-se a zo bet diouzh ar c'hiz a c'houde ar bloavezhioù seikont. Mat eo, se a zo sklaer, ar stourm evit ar yezh hec'h-unan met, d'hor soñj, n'en em harp war dezrann resis ebet eus gwir saviad ar yezh ; kenderc'hel a reer d'ober bruderezh e-giz pa vije dalc'hmat ur yezh poblek bennak bev-buhezek da virout e-touez ar bobl. Moarvat, e ranker tennañ mad, keit ha ma c'heller, eus restachoù ar rannyezhoù e-mesk an dud war an oad e Breizh hogen adal bremañ e tlefed dremmañ ouzh ul leviadurezh-advrezhonekaat (e gwirionez ez eo DIWAN hag an aotreegezh darn eus hevelep leviadurezh hogen den ne gred anzav sklaer an dra-se, ha DIWAN a-hend-all a chom e kazel-gê gant eorizh ar yezh poblek)

Pezh a ziskouez ivez ar mesk a zo e mennozioù darn eus kenlabourerion ar gelaouenn-mañ ez eo ur varzhoneg (pe ur ganaouenn?) enep-kristen diskiant a-walc'h, evel maz eo bet ar c'hiz ivez er bloavezhioù seikont, gant ur skrivagner yaouank, emichañs, e-lec'h e lakaer kristeniezh ha trevadennidigezh e Breizh war an hevelep pazenn, ha kiriek o-daou da walleurioù Breizh. N'eo ket chañs : Breizh er mare-mañ n'eo na kristen na trevadennet, ha se abaoe ur pennad amzer dija. N'eus nemet ar re gozh o virout ar yezh pe o vont d'an iliz. A-hend-all ez eo Breizh enframmet - evel Bro-C'hall e bed ar C'hornog ha dre se n'eo ket muioc'h trevadennet eget Bro-C'hall dre vras, pe... an Teksas e-unan. Un trevadennadur a zo bet d'ur mare e Breizh moarvat : hini ur vroad a blouezidi gristen gant ur vroad a vourc'hizion digristen met petra 'fell deoc'h, se a zo echu bremañ, o vezañ maz eo bet troet an

darn-vuiañ eus ar Vrezhoneg da C'hallaoued a gleiz pe a zehoù, ha na c'hellont ket bezañ trevadennet diouzh ma viront un emskiant c'hall. An emsav hepken a zo trevadennet ha gwasket e Breizh, dre m'emañ ar wirionez istorel diwar-benn Breizh gantañ.

Eveljust, marv an trefodajoù ne dalv ket ez eo arabat adsevel Breizh hag ar brezhoneg, hogen reizhabeget eo ar stourm e sell da se gant arbennoù all a bep seurt ha n'o deus netra da welout gant buhez pe varv ar rannyezhoù : istor Breizh evel broad, ar ret maz eo diskar ar Stadoù Arnevez gwitibunan, dre m'o deus krouet ar sevenadur digristen dizenel maz omp beuzet ennañ, an ezhomm a zo, dres, da grouiñ ur sevenadur nevez, h.a. met kement-se, a-benn ar fin, n'en deus darempred ebet gant an argerzh istorel anvet didrevadennadur pe al luskad marksat kleizelour a zo disoc'het war grouidigezh Stadoù mac'hom nevez e pep lec'h dre ar bed, miret ganto yezhoù an drevadennerion end-eeun ha gwasket ganto ar c'henelioù a zo bet enklozet e diabarzh gladbonnoù tidel a-grenn peogwir, adarre, e oant bet divizet gant an drevadennerion o-unan. Poent e vefe enta da zarn paouez a randoniñ pelloc'h diwar-benn trevadennadur ha didrevadennadur.

Evit distreiñ d'ar gelaouenn hec'h-unan. Eeun ha reizh eo peurvuiañ ar yezh anezhi, daoust ma vefe gwell, d'hor soñj, c'hwennat un nebeut rannyezhekadurioù a servij dreist-holl da ziskouez o deus ar skrivagnerion un darempred gant ur parland brezhonek bennak ; se a gomprenan ha pa oan yaouank e oan techet d'ober kement-all, met - war hor meno bepred, ne c'hell hevelep rannyezhekadurioù nemet degas dizurzh er yezh hiziv an deiz ha

diaesaat ar brezhoneg evit ar re yaouank end-
eeun o deus da addeskiñ anezhañ penn-da-
benn.

An hevelep temoù un tammig eo a vez meret
e-barzh AL LANV, nemet e kaver ouzhpenn er
gelaouenn-mañ pennadoù diwar-benn ar broioù
keltiek hag ar politikerezh etrevroadel. Kalone-
koc'h eget re all en emsav eo ar gelaouenn-
mañ diouzh ma kred tagañ war-eeun ar galloud
komunour etrevroadel, hag a-zevri (daoust maz
eus tu da zizoleiñ e-barzh kelaouennoù brezho-
nek all un damveneg eus gwall saviad Polonia,
da skouer, ne vez ket tamallet nemeur ar gal-
lourd a zo kiriek d'ar mac'homerezh er vro-se).
Ne gil ket ar gelaouenn-mañ zoken dirak an
tabuterezh diwar-benn ar skritur pe al luskad
falc'huneger (n' intentan ket mat e gwirio-
nez perak e kendalc'h hiniannoù da chinkanat
diwar-benn afer an doare-skrivañ gant argu-
zennoù tennet eus un istor aet da get pellzo
ha n'o deus talvoudegezh ebet evit ar re
yaouank).

Moarvat e komprenan e vefe imoret lod dre
ma welont ez eo oberiantoc'h, a-benn ar fin,
emsav ar "peurunvan" eget hini ar'falc'huneg'.
E devoud e vez embannet er mare-mañ, diwar
hil AL LIAMM, da nebeutañ, teir c'helaouenn e
'peurunvan' gant ar rummad yaouank (AL LANV
BREMAÑ, EVIT AR BREZHONEG) tra ma n'eus
nemet BRUD NEVEZ da vezañ embannet e 'skol-
veurieg' (ha c'hoazh, evel IMBOURC'H, ez eo
renet ar gelaouenn-mañ gant ur stourmer eus
ar goudevezh-brezel, ha n'eus nemet tud en
oad o skrivañ enni). Ma verkan kement-se n'eo
ket eveljust evit tagañ ur gelaouenn bennak
(siwazh, ken distank eo ar stourmerion evit ar
yezh ma tlefent ober o seizh gwellañ evit te-
c'hout diouzh an tabutoù kenetrezo). Anzav a

rin enta ez eo pennek ha dalc'hus rener BRUD
NEVEZ hag e vez embannet pennadoù talvoudus
en e gelaouenn bep an amzer. D'am soñj e
c'hellfe padout ar gelaouenn-mañ - a zo len-
negel-rik a-hend-all, evel DIHUNAMB gwechall.
Se hon eus bet tro da lavarout endeo hogen
gwell e vefe lezel tabutoù zo a-gostez.

Hogen distroomp d'ar gudenn hec'h-unan a
zo stignet dindan an tabuterezh diwar-benn ar
skritur : perak, lakaomp, n'eus ket a stour-
merion yaouank el luskad falc'huneger ? E
gwirionez n'eo ket dre zegouezh ez eo chomet
ar re yaouank pell diouzh al luskad-se : dre
maz eo enepbroadelour, dres, ez eo pellaet ar
yaouankizoù dioutañ. Ha kadarnaet eo ar var-
nadenn-mañ gant droukverzh an aotreegezh
vastard saoznek-brezhonek ijinet gant kevrenn
geltiek Skol-Veur Vrest. N'eus bet, ma n'omp
ket faziet, nemet un dousennad bennak a stu-
dierion o reiñ o anv evit aotreegezh Vrest tra
maz eus bet tregont gwech muioc'h - 336 -
oc'h en em enskrivañ e Roazhon, e Breizh-Uhel,
evit an aotreegezh vrezhonek-rik. Perak ? Peo-
gwir ez eo ar re a zo atebek eus an aotree-
gezh e Roazhon Brezhoned emskiantek ha kem-
poell, a oar ervat n'eus dazont ebet d'ar
brezhoneg er-maez eus ur vroad vrezhon adsav-
vet, - da lavarout eo, a gred e dazont ar
brezhoneg evel yezh vroadel. Er c'hontrol ez
eo bet diazezet al luskad falc'huneg war ur
savlec'hiadur enebet-krenn ouzh hemañ : ar
brezhoneg, yezh ar bobl, miret d'ar bobl hep-
ken, an dud eus kêr hag ar vourc'hizion o
kenderc'hel da c'hallegañ, ar galleg o chom
ar yezh voutin d'ar 'bobl' ha d'ar 'vourc'hi-
zion' end-eeun, ar Vrezhoned o vezañ sellet
evel Gallaoued, tonket dezho chom Gallaoued da
viken. Piv avat a c'hellfe stourm evit yezh

(skrivomp, kentoc'h, 'trefoedajoù') tud' paour, mezh enno o komz ur rannyezh didalvez dezho da gemer perzh er vuhez arnevez end-eeun ? Diouzh ur seurt savboent emañ ar brezhoneg bannet d'ar marv ha rak-se em eus enebet adal ar penn-kentañ ouzh al luskad falc'hunek ha na c'helle nemet bezañ drastus evit dazont hor yezh.

Kement-se, forzh penaos, a zo un afer eus an tremened. Hogen sklaeroc'h-sklaerañ e teu da vezañ n'eus buhez bet da c'hortoz d'ar bobl vrezhon er-maez eus ur vroadelouriezh digor ha splann. Merket hon eus e vanke ar seurt broadelouriezh da U.D.B., da skouer (tennañ a rafe LE PEUPLE BRETON d'un doare kelaouenn a studi armerzhel breizhat temzet gant un tabuterezh kleizat-sokialour gall, gwall heñvel ouzh hini ar strolladoù kleizat gall) hag e oa dleet kresk gorrek ar strollad-se d'an diouer a spered broadel taer.

"REPUBLIQUE BRETONNE"

N'eo ket hevelep didaerded a c'hellfed tamall d'ur Strollad Pobl Vreizh nevez savet ha d'ar galaouenn "République Bretonne" a zo o paouez dont er-maez. Skrivet em boa en un niverenn ues IMBOURC'H e tiskoueze ar Strollad nevez bezañ hêr da vBREIZ ATAO ha d'ar Strollad broadel a-raok hag e-pad ar brezel diwezhañ. Abaoe em eus bet ul lizher a-berzh ur stourmer eus KUZUL AR BREZHONEG evit va lakaat war ziwall ouzh ar Strollad nevez ha na vije hêr e nep doare da emsav broadelour Breiz Atao, Gwalarn, AL Liamm (gwir eo ez eus ur c'hendalc'h istorek etre al luskadoù-se) hogen a vefe awenet gant ur spered dehouelour ha faskour zoken, da argas a-grenn. Evit klozañ :

K.A.B. hepken en defe ar gwir da sellout outañ evel hêr BREIZ ATAO ha GWALARN. Mat. An diskan-se am eus klevet dija gant E.S.B. pemzek vloaz bennak a zo ; eno ivez e luger-ne steredenn vBREIZ ATAO war an dremmwel, a-dreñv d'ar strollad 'keta ! Diouzh un tu all em eus klevet tud eus UDB oc'h asuriñ e oant-i mibion vihan vBREIZ ATAO. Hogen piv en emsav a c'hellfe lavarout ned eo ket gourvab da vBREIZ ATAO ? AR FALZ kozh hag EMGLEO BREIZ diwanet dioutañ dreist-holl a zo bet krouet gant Yann Sohier ha Kerlann, daou vreizhatavad touet, ha Keravel e-unan en deus kenlabouret gant Kerlann e-pad pell amzer. Hiziv c'hoazh e kendalc'h BRUD NEVEZ da embann skridoù eus Kerlann, goude bezañ advoulet meur a wech oberennoù Jakez Riou, ur Breizhatavad eus an taerañ seurt (kv. Nominoc-Oe). An holl ac'hanomp en emsav, adal EMGLEO BREIZ betek KUZUL AR BREZHONEG, o tremen dre an UDB ha STROLLAD POBL VREIZH ez omp bu-gale vihan da vBREIZ ATAO.

Setu perak ivez e kavan un tammig diboell a-berzh hiniannoù zo ober un diforc'h etre deñved ha bouc'hed en emsav, an deñved o vezañ leal ouzh Bro-C'hall tra ma ne vefe ket ar re all ; se a zo klask touellañ ar C'hallaoued gant un distinguo re sotuil evit o spered a zo un tammig gros pa vez anv eus Breizh hag an emsav. Rak a-benn ar fin e ren an emsav sevenadurel penn-da-benn an hevelep politikerezh hiziv an deiz, hini ar c'henlabour gant ar pennadurezhioù gall evit lakaat ar brezhoneg er skolioù. Hogen ar pennadurezhioù-se n'int ket sotoc'h eget re all ha gouzout a reont ker-koulz ha pep unan da biv eo mab kement strollad a zo en emsav. Penaos e c'hellfent divunout a-hend-all petra soñj pe a sant pep

stourmer e don e galon ? An holl anezho, diouzh ma sellont ouzh Breizh evel ouzh o bro hag ar brezhoneg evel ouzh o yezh, a zo pilpouzion ; met, eveljust, n'eo ket din divizout gant piv ez afe ar maout evit pezh a zo eus ar pilpouzerezh ; ne fell ket din memestra lakaat gwarnizi da sevel etre ar gevezerion !

Distroomp avat d'hor pennmeot, STROLLAD POBL VREIZH ha "République Bretonne". Disheñvel eo evelkent degouezh ar strollad-mañ dre maz embann, evel BREIZ ATAO ergentaou, e fell dezhañ sevel ur Riez Vrezhon. Oc'h ober se e kemer stourmerion ar strollad-mañ ul lec'h diaes ha chomet goullo abaoe maz eo steuziet BREIZ ATAO end-eeun, ul lec'h dañjerus maz eo aes strebotiñ warnañ. Setu, karout a rafen lakaat ar re yaouank a bled gant an aozadur nevez-mañ war evezh ouzh meur a skoilh. Ha da gentañ, ouzh hini ur romantelouriezh verrboell. Arabat e vefe dezho, da skouer, mont da veskañ Brennos gant... Che Guevara, evel ma oa ar c'hiz gant stourmerion all, en amzer "Bretagne Révolutionnaire" pemzek vloaz bennak a zo, - war zigarez e vije bet an dispac'her su-amerikat hanter a ouenn iwerzhonat. Sur-mat, an dave da vBrennos a zo breizhatavat-rik : GWALARN a zo bet diazezet war ar SKETLA SEGOBRANI hag an NOTENNOU DIWAR-BENN AR GELTED KOZH. Met GWALARN a chome war dachenn al lennegezh ha gouzout a rae Roparz Hemon ez eo hêr hor sevenadur europat d'an hini gresian-roman, kreisdouarek dre vras, diwanet e e deroù an istorvezh. Hor c'hevaled istorek deomp-ni Europiz, pe e plij deomp pe ne blij ket, a zo gresian-roman ha kristen goude ma ve keltiek hon hengoun; komz a ran eus kevala istorek peogwir emañ ar pobloù keltiek kozh er ragistor, da lavarout eo, evidomp en di-istor, -

diouzh ma n'o deus lezet testeni ebet diwar o fenn nag hengoun politikel ebet a vije padet a-hed ar c'hantvedoù ; ar bobl vrezhon diazezet el ledenez-mañ ne oa ket ur bobl hen geltiek o tont eus Breizh-Veur (meur a hini a seurt-se a oa staliet e Preden en amzer Kezar, lakaomp,)- ur boblañs a yezh keltiek lieskenek, unanet avat a-enep d'ar Varbared gant ar feiz kristen hag an hengoun roman, evel m'henn diskouez studiadennoù L. Fleuriot. Hag a-hend-all, peseurt darempred a c'hell bezañ etre unimpalaeriezh keltiek a oa ledet penn-dabenn da Europa a-bezh hag ar vro vihan a fell deomp adsevel war undro gant ur sevenadur nevez nemet gwirizennet evelkent en istor Europa gristen. ? Komz a ran evit KRISTENION BREIZH eveljust. Hogen ret eo bepred chom war evezh ouzh emdouellioù hag eorizhoù ar re a lavar e vennont distreiñ da vammennoù pagan digristen hor sevenadur, evel ma rae ar genelwerinelourion en hanterenn gentañ hor c'hantved : ar mojennoù pagan n'o doa ket muioc'h a bouez e politikerezh hag e stuzegezh ar remañ eget e re ar gristenion (rak ensammet eo bet ar baganiezh er gristeniezh, se a ouzer a-walc'h : gouelioù, keheladur ar sent e sigur feunteunioù h.a.) ha gwir gelennadurezh an nazied, da skouer, ne oa nemet ar stadazeule-gezh hegelat en doa devoudet diagent savidigezh an Alamagn unanet. Se hepken a oa gwirion ha fetis e kelennadurezh ar genelwerinelourion alaman.

Eveljust Che Guevara n'eo ket Hitler. Ha me 'responto deoc'h : peogwir n'en deus ket bet amzer ; ur marksour e oa Che Guevara hag hag evel marksour ne c'helle c'helle e oberezh diboufañ nemet war ur stadelouriezh va-c'hom evel m'henn diskouez a-walc'h ar

renadoù komunour bet diazezet penn-da-benn d'ar voull-douar ha, da gentañ, e Kouba endeeun.

M'em eus kemeret skouer Brennos mesket gant Che Guevara ez eo hepken evit reiñ da gompren d'ar stourmerion a glask diazezañ ur Strollad nevez ez eo arabat dezho en em zougen evel stourmerion all a glaskas ivez dek pe bemzek bloaz zo diazezañ strolladoù kleizelour ha broadelour, e-giz BRETAGNE REVOLUTIONNAIRE, STROLLAD KOMUNOUR BREIZH ha SAV-BREIZH pe c'hoazh EMSAV STADEL BREIZH, war-lerc'h brizh-dispac'h 1968. An holl danvez aozadurioù -se a steuzias a-benn un nebeut bloavezhioù dre ma ne oa lec'h ebet da gemer en tu-kleiz en emsav. Heñvel eo ar saviad politikel e Breizh hiziv. Dister a-walc'h eo an U.D.B. hep ma vefe ezhomm lemel diganti an nebeut stourmerion a zo techet da Vreizh e-touez ar gleizourion en hor bro. Arabat eo enta d'ar re a garfe sevel un aozadur politikel nevez distag diouzh U.D.B. bezañ spontet o soñjal e c'hellfent bezañ skritellet evel dehouiz ; n'eus forzh penaos e vint kunujennet gant ar re a fell dezho bezañ "ar gostezenn gleiz" e Breizh, - ma reont un tammig berzh(a-hend-all e vo tavet warno, ha setu holl). E-giz ma lavarar, o c'houstiañs a zlefe bezañ a-walc'h dezho. N'eo ket abalamour ma n'int ket eus an tu-kleiz e vint eus an tu-dehoù, ha dreist-holl eus an tu-dehoù pellañ. Nemet, na petra, dav eo dezho kemer ur savboent diforc'h-krenn diouzh hini U.D.B., lakaomp : difenn ar frankiz war un dro gant ar yonezkevredigezhel hag an atlantelouriezh : n'o deus nemet lezel d'ar gleizourion vreizhat gortoz donedigezh Soviediz evit kas da benn o uhelvennad e Breizh : kaer o devo ober, degaset e vo ar re-se da genlabourat

gant ar Rusianed (pe ur galloud a-du gant ar Rusianed e Pariz) : n'eus nemet gwelout pegen klouar eo bet barnet ganto taol-strap Jaruzelski e Polonia. War an dachenn-se adarre ez eus ul lec'h da gemer e Breizh d'ar stourmerion a garfe sevel ur strollad politikel nevez.

Evit pezh a zo eus ar 'vroadelouriezh' ha diarc'hadur an dizalc'hded hag an dishualded n'hon eus netra da lavarout eveljust. A-du omp war ar pal-se. Hogen er stad m'emañ Breizh ne c'hell bezañ tizhet nemet a bazennoù ha dre hir amzer : Breizh n'eo ket Aljeria ; hag ivez e diabarzh ur reizhiad kevangevreadel en Europa, hag a rofe un dezvad kevatal da holl vroadoù istorel Europa. Evidomp ez eo ken pouezus sevel Europa gristen en tu all da ziskar ar Stadoù Arnevez ha diogeliñ dishualded Vreizh.

Dre se ivez e kav deomp ez eo digoulzat a-grenn kement feulster a garfed implijout evit kas war-raok ar stourm e sell d'ar frankiz. Re vras eo an dañjer na vefe atoret ar feulster er mare-mañ gant luskadoù a-du gant Soviediz, goude ma rafent kleizelourion anezho nemetken.

Pouezus eo d'ur strollad politikel brezhon kavout an hent reizh evitañ ; emañ war var a-hend-all d'ober tro-wenn ha da zigalonekaat stourmerion a c'hellje bezañ graet labour talvoudus en un aozadur all. An dra-se a zo c'hoarvezet re alies e Breizh abaoe pemzek vloaz bennak.

DIWAN da vezañ stadelet ?

Tro am eus bet da zivizout e dibenn ar bloaz tremenet gant ur stourmer a ra war-dro

DIWAN hag a lavare din ne c'helle an aozadur -se nemet goulenn bezañ broadelet rak ne dizh ket bevañ ar skolaerion a bled gantañ. Kompren a ran ur seurt savboent hag a zo bet hini ar skolioù kristen ergentaou : an diskoulm aesañ, da c'hortoz, eo ar stadeladur. Gwir eo ivez ; nemet ar yezh, peseurt diforc'h a zo etre DIWAN hag ar 'C'helennerezh Broadel Gall'? Direlijiel eo an eil hagegile. N'on ket sur kennebeut ez eus broadelourion dre ret eus ar gerent a gas o bugale d'ar skolioù brezhonek-se. Ne zlefe ket enta bezañ re a ziaesterioù evit ar 'C'helennerezh Broadel Gall' da glenkañ ar skolioù-se en e reizhiad-skoliañ hollek ; ar pezh a rofe an tu da zerc'hel ar yezh bev en un tammig metou zo. Forzh penaos, an hevelep savboent a zo da g'Kevredad ar Gerent a-du gant ar Brezhoneg' diazezet e Roazhon hag a zo o paouez embann ul levrig diskouezet kaer ma tispleger ennañ ur steuñv da ledañ kelennadur ar yezh er skolioù elfennel kefridiel.

Un tu d'ober ur gammed war-raok e c'hell bezañ ar politikerezh-se. Ret-mat eo gouzout koulskoude ne ziskoulm ket kudenn dreistbuhez hor yezh, - ma tiskoulm kudennoù ar stourmerion a ra war-dro an aozadur rak ne ra nemet kreskiñ galloud ar Stad c'hall e Breizh o startaat he c'hrog war an emsav e-unan. Pezh a fell deomp-ni atav, avat, eo lemel digant ar Stad dre vras, ha digant ar Stad c'hall e Breizh, peurgent, he roll a aotrouniezh spere-del skrapet ganti end-eeun war-bouez pakañ krog er c'helennerezh penn-da-benn. D'ar gerent eo, da gentañ, bezañ mistri ar skolioù, kentañ hag eil derez, ha reoliñ anezho ; ha goude-se, er Skol-veur, ez eo d'ar studierion ha d'ar gelennerion strollet kenetrezo melestrañ anezho, ur wech klevet en deus pep rumm ar gwir da

sével ar skolioù en deus ezhomm anezho. Ha dres, anzav a ranker ne gas ket d'ar pal-se hent ar broadeladur. Setu ar pezh a c'hellomp lavarout evit ar poent.

"Ar gwir da vezañ disheñvel"

E miz c'hwevrer diwezhañ ez eus bet un tamm reuz e Roazhon dre m'en doa nac'het an arc'heskopti feurmiñ pe brestañ fiñvskeudenndi ur barrez - hini Sant-Heler, an ARVOR, - d'ur 'sine-kleub' bennak a vanne dreist-holl pe alies - a-hervez - filmoù mui pe vui gadal pe o verat dodenn an heñvelrevouriezh, lakaomp. N'anavezomp ket mat ar gudenn rak abaoe tregont vloaz bennak ne daolan gwech ebet va zroad en ur fiñvskeudenndi, - marteze ur wech ar bloaz, e-pad ehanou an hañv, pa vez glav, ha c'hoazh n'eo ket sur.

Diouzh dazweredoù zo a zo en em ziskouezet e-barzh kelaouennoù zo e komprenan ez eo bet feuket hiniannoù e Roazhon gant taol-beli an arc'heskob, hini pe hini o tamall dezhañ e strizhder-spered pe o venegiñ an Aviel evit asuriñ ne oa ket chalet ar C'hrist gant ar c'hudennoù a vuhezegezh. Moarvat en deus ar C'hrist pardonet d'ar vaouez avoultrerez met n'en deus ket lavaret e rae mat, a gav din ; ha gwashoc'h eget pep tra, barnet en deus zoken ar c'hoant hudur e-unan, pa ne ve ken. Hag erbedet en deus, diwar vont-dreist met ne vern, troc'hañ kuit an ezel a c'hellfe sachañ ar c'horf penn-da-benn d'ar gollidigezh. Kaer am eus bet klask ivez, n'em eus ket kavet meneg eus ar bailharded, heñvelrevour pe arallrevour, e-touez heriturion an Neñv en Evurustedoù. Pezh a ziskouez e vefe furc'h da lod chom hep menegiñ an Aviel, zoken evit

kenteliañ un arc'heskob.

Gant lod, hiziv, e vez diazezetar gwir da bep hini da ren ar vuhezgezh a blij dezhañ-eñ war "ar gwir da vezañ disheñvel". Dres awalc'h, ar c'heal eus an 'disheñvelled' eo a zo disklaer hag amsteriek. Anat eo, da skouer, en deus pep hini ar gwir da bediñ Doue en e yezh hag en ur stumm a glot gant e bersonelezh ; ar gwir hon eus ivez da eztaoliñ hon hiniennelezh o klask ar mad. Met n'eo ket se a ziviz ar mad e-unan, eveljust. Rak adarre, arabat eo droukveskañ an devoud gant an talvoud, e-giz m'hon eus bet tro da verkañ meur a wech. Un devoud eo en hor c'hevredigezh e c'hell pep unan en em zougen e-giz ma kar hag ober tost da vat ar pezh a blij dezhañ. Kement-se ne dalv ket ez eo mat kement a vez graet gant pep hini. Ha n'eo ket dre ma ra an 'arallrevourion' en hor grez hogozik n'eus forzh petra war dachenn ar 'rev' end-eeun o deus an 'heñvelrevourion' ar gwir d'ober kement-all, da skouer, en anv "ar gwir da vezañ disheñvel". Sujet eo an eil rumm hag egile d'an hevelep lezenn ; goulennet eo digant an eil re hag ar re all chom hep ober un dramm eus ar 'rev' ; ha doujañ kement a denn d'ar vuhez ha d'an tiegezh evel talvoudoù sakr. Hiziv an deiz avat ez eo prest an darn-vuiañ da asuriñ n'eus na mad na fall na pec'hed hag e c'hell pep hini divizout e lezenn-eñ e-unan ; da lavarout eo, ober anezhañ e-unan, gant e zibarderioù dargouezhel, un Doue (e gwirionez, setu tezenn an anveliourion). Neuze avat, o chom war dachenn ar 'rev' - evel m'hon eus merket endeo - en anv peseurt pen-naenn tamall ar wallerion hag an dorfetourion revel o deus ivez, paour-kaezh tud, ar gwir da vezañ disheñvel ha da dizhout o eurvad

e-giz ma c'hellont. Eveljust e tiskleir an 'divezouriezh lik', an 'divezouriezh dizoue', a zo e talvoud en hon amzer, ez eo bevennet frankiz pep hini gant mad an nesañ. Neuze avat e chomomp penn-da-benn e rez an devoud ; da lavarout eo, nerzh pep hini a ziviz ment e wir. En ur seurt divezouriezh ne c'hell bezañ na mad na fall peogwir n'eus patrom trabedel na trehontel ebet d'ar mad e-unan. Mistri ar galloud eo a ziviz neuze reolennoù an divezelezh, hervez o mad-int o-unan (ezhomm o deus ar vistri-se e ve un urzh bennak er gevredigezh ; a-hend-all ne c'hellfent ket mirout o lec'h ; met divizet eo neuze ar vertuz pe ar pec'hed gant ar retvezh-se end-eeun). Setu penaos ez eus bet gwechall - hag e vo en dazont - kevredigezhioù diazezeta war ar sklavelezh. Perak ? Peogwir o doa divizet ar Vistri - ar re drec'h, ar re greñvañ, e oa mat an traoù evel-se : par e oant da Zoue peogwir o doa ar Galloud.

Eveljust e soñj d'an anveliourion ez int tud vat ha reizh, gouest da lakaat ar yonez da ren. Hogen evit diazezañ ar gevredigezh eeun a huñvreont enni e vefe ret d'an holl gwitubunan bezañ reizh evelto, da gentañ ; ha d'an eil, o vezañ ma n'he defe o divezouriezh diazez trabedel ebet e chomfe tidel ha diboell, istribilhet er goulloder ; den ne c'hell difenn an diboellded avat ha dre se e vefe ar gevredigezh bepred war var da gouezhañ ekraban n'eus forzh peseurt rumm a vac'homerion.

An dalc'h a zo aze a-hend-all : daoust ha mab-den a zo mat dre natur ? Siwazh, n'eo ket madelezh mab-den en em ziskouez a-hed an istor ; se a ranker adlavarout atav. Rak a-benn ar fin, dalc'hmat ez eo an hini trec'h a ziviz ar mad hag ar fall "hervez e did hag e imor"

Sklaer e tlefe bezañ d'an holl ne c'hell bezañ da vab-den nemet ur patrom trehontel, luniet gant Doue e-unan, anadet er C'hrist, Doue ha Den. E sigur patrom-se e c'heller komz eus mad ha fall. Met gwir eo, kement-se n'en deus urster nemet e par ar feiz hec'h-unan.

Evit distreiñ da dem ar "gwir da vezañ disheñvel", a vez graet implij anezhañ evit difenn ha reizhabegañ 'froudennoù'an emsaverion koulz ha re an 'heñvelrevourion' pe c'hoazh, ar 'gristenion' bremañ, dav eo din anzav ne blij ket din nemeur. Evit pezh a zo eus an emsav, n'eo ket bet arveret seurt arguzerezh nepred gant ar vrogarourion vrezhon betek-henn. En amzer BREIZ ATAÖ e oa diazezet arc'hadurioù ar stourmerion vrezhon da gentañ war gwir istorel ar vroad vrezhon da vezañ dishual, ha n'eo ket war wir hiniennoù zo da walc'hañ o ezhomm eus ur vreizhadelezh tidel a-grenn. Hiziv ivez e ra ar "gwir da vezañ disheñvel" en emsav dave d'ar youl da vezañ perzhiek e sevenadurtasmantel ur boblad eorizek a werinourion a zo steuziet e Breizh evel e broioù all ar c'hornog ha ken tasmantel eo ar gwir-se hag ar werin ma ra dave dezhi.

A-hend-all e lavarimp ez eo divourrus-krenn ton reuzeudik ar re a c'houlenn ar gwir da vezañ disheñvel, hag a zo hini tud a zo diazezet o c'houstiañs, hag int o c'hortoz, dre druez, bezañ gouzañvet e-giz m'emañt ; an dud asur anezho o-unan ne c'houlennont digarez ebet evit bezañ pezh ez int, disheñvel pe get. Siwazh, ar spered reuzeudik-se eo a zo o c'hounit ar gristenion o-unan, a vez o leñvañ gant ar soñj n'int ket heñvel, allaz, ouzh ar peur-rest eus o c'hempredidi.

A-benn ar fin, ar pezh a zo e diazez an

holl reuz a vez hiziv an deiz gant ar re a zo o c'houlenn e ve gouzañvet o disheñvelder evel 'si fall bihan personel', emsaverion, kristenion, heñvelrevourion, eo un hollgeñveriadegzh he defe da c'her-stur : da bep hini e wirionez ; da lavarout eo, n'eus gwirionez ebet. Ha biken ne c'heller gwir emsaver ha gwir gristen ebet degemer seurt savboent.

Moarvat ne c'heller ket rediañ an dud da zegemer dre heg ar wirionez ; o zreiñ da draoù ne rafed ken neuze ; e pep frankiz e tle bezañ kavet ha degemeret ar wirionez. Hogen n'hon eus, evel emsaverion pe gristenion, da reiñ absolvennebet d'an dud. Da bep hini eo sammañ e atebegzh e-unan.

Gwir eo ez eo skignet ar spered reuzeudik hag a vrizh-truez e pep lec'h en hor sevenadur arnevez. Nevez zo em eus bet tro da lenn e brezhoneg ul levr en deus plijet din a-hend-all, hag a zo skrivet gant ampartiz, a zo e dalbenn "Truez, va Doue !" gant Didrouz. E-giz m'emañ o paouez merkañ, donezonet-kaer eo ar skrivagner, reizh ha liant e yezh, lies-seurt danvez e gontadennoù. Koulskoude, an talbenn e-unan a glot a-walc'h gant ur stuzegezh kristen (brizh-kristen, kentoc'h) arnevez, a zo prest da zamantiñ d'ar pec'her, - n'eo ket peogwir e pec'h, met peogwir n'en defe ket ar gwir da bec'hiñ. Anzav a ran n'em eus ket santet kalz a druez evit an tudennoù kaezh a zo luziet o buhez e kudennoù santimantel a bep seurt, kudennoù ha n'int ket da vezañ dis-moulmet diouzh gourc'hemennoù Doue hag an lliz zoken met dre ar skiant-vat hag ar furnez da gentañ : peseurt dazont a zo, da skouer, d'ur garantez pe d'ur vignoniezh ha n'eo ket diazezet war ur genvuhez hag ur c'henlabour bennak ? (Ha ne c'heller bezañ mignon da

Zoue nemet o kenlabourat gantañ, 'keta ; se a zo ivez un afer a skiant-vat).N'eo ket yac'hus - d'am soñj - reiñ da grediñ d'an dud ha dreist-holl d'ar re yaouank e c'hellfe an "draonienn-mañ a c'hlaç'har" bezañ troet dre ur burzhud bennak en ur Baradoz-an-Douar bennak, pezh a reer koulskoude o prezeg dezho "ar gwir da vezañ evurus" pe "ar gwir da vezañ disheñvel" en un doare diboell ha difur. Bez' ez eo an douar un dachenn-emgann ma ranker stourm enni a-enep d'an holl hag a-enep deomp hon-unan, ma ne fell ket deomp da bep mare kouezhañ en-dro e bugaleaj ha chom da viken babiged ha magadelled.

Polonia ha taol-strap Jaruzelski

N'eus ket mui kalz kazetennoù o komz eus Polonia hiziv. Un afer renket eo, 'keta. Un abeg mat evit IMBOURC'H da embann un tamm pennad diwar-benn ar vro-se.

A-benn ar fin ez eo c'hoarvezet e Polonia ar pezh a oa rakwelet ha gedet gant an holl, er reter koulz hag er c'hornog, evel m'henn diskouez a-hend-all ur skeudenn-lu eus ar Washington Post hon eus bet tro da advoulañ er gelaouenn-mañ. Distrujet o deus ar penna-durezhioù poloniat ar c'hweluniad Solidarnosc ha toullbac'het an holl stourmerion a hiraezhe d'ur renad nevez frankizour e Polonia.

Moarvat ez eo bet skodeget ha saouzanet an holl gant ar c'heloù en deroù. Diskouezet e oa bet ar glevgadour Jaruzelski evel un den damantus, ur brogarour a-hend-all, diskleriet gantañ un deiz n'en dije tennet biskoazh war ar vicherourion. Mat. Kement-se n'en deus ket miret ouzh ar glevgadour da derriñ e bromesa, ha da blantañ er c'hampoù-bac'h ar vicherou-

nion divergont a-walc'h evit goulenn labourat nebeutoc'h ha bezañ paet gwelloc'h. Se n'eo ket reizh memestra.

En em c'houlenn a reer evelkent perak o deus gortozet keit all ar gomunourion evit kas da benn o zaol-nerzh e Polonia. Pevarzek vloaz zo, e Tchekoslovakia, ne oa ket bet ken seizh-daleet ar Rusianed, ha diskoulmet o doa ar gudenn en un nozvezh. Perak enta o deus termet keit all ar Rusianed hag ar gomunourion e Polonia ? Un nebeut diskleriadurioù a c'heller reiñ.

Da gentañ, hag int luziet en o brezel en Afganistan, ne c'helle ket ar Rusianed sammañ riskl ur c'henstok nevez er C'hornog. War var edont da vroudañ brogarouriezh Poloniz ha d'o zolpañ en-dro da SOLIDARNOSC. Gwell e oa ganto enta o dije ar gomunourion boloniat o-unan lakaet urzh en o bro. Hogen ne oa ket kreñv a-walc'h beliezh dinazel ar Strollad Komunour e Polonia evit kas da benn ur seurt oberiadenn. Al lu hepken, hag ar gerreizh a oa efedus a-walc'h evit kefleuniañ hevelep kefridi. Ha moarvat ez eo bet ampellet an oberiadenn evit reiñ amzer d'ar gerreizh endeeun da seveniñ a-zoare he labour-titourañ ha klokaat he fichennaouegoù : pezh a oa d'ober da gentañ e oa lezel an danvez-dispac'herion d'en em ziskouez evit gellout o herzel pa vije deuet poent. Houmañ a oa ul leviadurezh klasek-tre, anezhi ul leviadurezh-vroudargadiñ. Ur wech deuet ar mare ne oa mui d'ober nemet kutuilh ar re a oa bet difur a-walc'h evit kemer perzh en emsav Solidarnosc.

Kredapl eo koulskoude en dije gouzañvet ar galloud komunour pelloc'h an nagennerion ma vije chomet ar re-mañ war an dachenn c'hweluniadel-rik, ar pezh a hete Walesa, da skouer,

da heul an eskibion moarvat.

Hogen Walesa ne oa ket mestr diharz an aozadur ma oa deuet da vezañ ar c'hadoriad anezhañ. Moarvat, ar bobl, ar vicherourion eo a rae nerzh Solidarnosc, hag ar re-mañ a wele e Walesa o rener natur. Padal e oa oberiant ivez e diabarzh ar c'hweluniad ur rummad stourmerion ha kefredourion a oa awenet gant ur stumm arbennik a varksouriezh, heulierion Drotski, hag a oa kreñv dija o levezon e Polonia etre an daou vrezel (notomp a-hend-all e en deus bet luskad Rosa Luxembourg ur pouez bras a-walc'h er vro-se ivez goude ar brezel kentañ). Bezet pe vezet, bodet e oa ar gefredourion drotskiat, a-du gant an emvererezh ha daskoridigezh ar galloud d'al labourerion o-unan, e-barzh ur stroll a oa anvet KOR ha da rener o devoa ur stourmer hag a oa e anv Kuron, a orin yuzev (se a zo da verkañ en ur vro maz eus enni un hengoun enep-yuzev bet arveret en degouezh-mañ gant ar galloud komunour devoudel). Ouzhpennomp e oa oberiant e Solidarnosc un toullad stourmerion gristen araogelour o doa kenlabouret gant ar galloud komunour a-ziagent en ul luskad a oa anvet PAX, reolet gant ar strollad komunour poloniat. Mat. Ar stourmerion drotskiat o doa, hep mar ebet, ur pal politikel hag a oa distroadañ ar galloud komunour moskovat er vro evit staliañ en e lec'h unan all hag a vije bet, d'o soñj, muioc'h kenstumm ouzh ar gelennadurezh varksat diles (un tammig evel e Tchekoslovakia e 1968 : eno ivez en em gave un dornad kefredourion gomunour a garje bezañ adreizhet ar feiz komunour).

Kement-se, eveljust, ne c'helle ket bezañ gouzañvet gant ar galloud rusian, na kennebeut - eveljust - gant an nomenklatura boloniat, an

noblañsoù nevez, a felle dezho mirout o brientoù. Padal, o vezañ ma pade an dispac'h (pe an 'dispac'hadeg', ma kavit gwell) abaoe daou vloaz bennak e oa deuet stourmerion Solidarnosc da soñjal e vijent deuet a-benn da gemm dre gaer ar gevredigezh poloniat, hep taol-freiz ebet. Sañset, a-hend-all, e-giz m'hon eus merket, Jaruzelski a oa bet ur jeneral mat, unan en doa nac'het 'tennañ war ar bobl' e 1970 (ya, met en amzer-se n'edo ket e penn ar gouarnamant, 'keta!). Soñjet e oa ivez gant stourmerion ar c'hweluniad n'en dije ket kredet al levierzh enebiñ outo o vezañ ma oant harpet gant 95% eus ar boblañs. Ar fazi a zo bet graet avat eo betfaltaziañ evije bet tu da rannañ ar galloud etre ar c'hweluniad, al lu hag an lliz, evel ma spie ar re a gase en-dro an Dispac'h. Nemet drebenn a'n emdouell-se n'o deus ket klasket stourmerion Solidarnosc, da nep mare, mont dindan dec'h, en em guzhat ha ren o obererezh en dirgel, lakaet e vije bet tu : holl ez int bet paket evel razhed en un traped.

Bremañ e c'heller ober un nebeut evezhia-dennoù.

Krisoc'h eo bet ar galloud ouzh an drotkourion (boureviet e vije bet Kuron ha stourmerion a seurt-se) eget ouzh Walesa hag ar gristenion : truez ebet enta ouzhar veskerion hag an disivouderion (ar gristenion, da nebeutañ, a zo enebourion enorus!). Kement-se ne dalv ket e vo dieubet un deiz, siwazh, ar rener kristen ; n'eo ket sur zoken ne vo ket lazhet un deiz (krouglaset en ur foz bennak ; ho pezet soñj eus pezh a zo c'hoarvezet gant Nagy en Hungaria, da skouer), ur wech ma vo bet disoñjet

un tammig darvoudoù Polonia gant ar c'hedveno etrevroadel : an dra-se a zo diouzh pleustrerezh ordinal ar galloud komunour.

War an taol, eveljust, ez eo bet gwall fro-met ar c'hedveno er C'hornog gant taol-strap Jaruzelski, a zo bet keñveriet ouzh hini ur glevgadour all, Pinochet e Chile (notomp a-hend-all, diwar dremen, ez eo bet devoudet an daou daol-strap, evit darn, gant an hevelep abeg : an di-zurzh armerzhel ; hag ez eo bet implijet en div vro an hevelep louzoù : ar monc'hwezh ; e Polonia ez eo bet tric'hementet nevez zo priz ar marc'hadourezhioù). En un doare natur a-walc'h avat ez eo bet renet an eneberezh e Bro-C'hall gant ar CFDT, a-du gant an emvererezh hag ar galloud roet war-eeun d'ar vicherourion (eveljust, ivez, gant an lliz hag ar gristenion, met diouzh ur savboent disheñvel, na petra.) Hogen kompren a ran er-vat perak ez eo ken taer stourmerion ar CFDT o tifenn Solidarnosc ; enkrezet int gant ar rakwel eus ar blanedenn a zo ouzh o gortoz en deiz ma vint bet troet da heretiked ur Strollad Komunour deuet dezhañ an hollc'halloud.

Evit ar frankizourion, pe paotred ar gouarnamant gall o-unan, ur wech skuilhet un nebeut daeroù krokodil, ret eo anzav ez int bet divec'hiet-kaer gant taol-strap ar jeneral mat, unan c'hoazh a oar lakaat ar vicherourion da sentiñ ha d'ober o dlead evel ma tere. Soñjit ivez en holl viliardoù a zo bet prestet gant ar vanke-rion gornogat ha n'o dije mui gwelet al liv anezho ma vije bet goueledet Polonia en dispac'hadeg armerzhel. Evurusamant ez eus milourion a-zoare un tammig e pep lec'h dre ar bed evit derc'hel krog er stur, ha pezh a zo mat er broioù komunour, eo ne ziskrogont nepred dioutañ. Setu : penaos tamall ar Rusianed evit

bezañ roet kalon d'ar jeneral mat? Goude bezañ graet un nebeut rebechoù doaniet ha seven n'eo ket bet seizhdaleet ar gouarnamant gall evit sinañ ur marc'had eus ar c'hentañ gant ar gouarnamant soviedat, ha bennozh ar c'hentañ Maodiern kozh, Barre, war e benn, na petra - ur frankizour hennezh hag a wel an traoù e-giz m'emaint, hag a soñj evel nouspet frankizour all ez eo war-bouez reiñ mel d'an Arz moskovat e vo tizhet ar gwellañ e zoñvaat hag e gabestrañ ! E-giz ma kav d'ar sokialourion c'hall ez eo o dlead gwerzhañ armoù de renerion varksat Nikaragwa, - da gentañ dre m'o deus mennozioù mat, hag ivez evit mirout ouzh broioù all d'ober eno aferioù chugek mat, ne vern, eveljust ma vez implijet an armoù-se evit lazhadegañ Indianed warlerc'hiet ha na felle ket dezho lezel an Araokaat da dremen war o ziriad, e stumm ur gourhent...

Evit distreiñ da daol-strap Polonia : tregasus ha digalonekaus e tlefe bezañ evit an holl stourmerion a-du gant ar frankiz hag enebet ouzh pep stadelouriezh. An Drotskiourion a c'hourbonne, peurgent, e oa gouest ar Bobl, drezi hec'h-unan, da vezañ mestrez he zonkadur hag e oa a-walc'h arm an ec'hwel hollek da gemer ar galloud : degouezh Polonia a oa kemeret ur brouenn eus ar wirionez varksat-mañ. Siwazh, a-walc'h eo bet un nebeut devezhioù evit diskouez pegen aner e oa an huñvre-se, ha ned eo ar Werin, ar Yoc'h, - nemet enframmet en ur Strollad Stadel deuet da vezañ he Mestr - netra nemet un Tasmant.

Youenn OLIER

+++++

NOTENN

Stagañ a ran un notenn e sigur afer Polonia. Dre vras o deus bet katoliked ha kleizelourion an hevelep ersav dirak an darvoudoù er vro-se. Padal eo ret notañ digemplegerezh un nebeut strolloù anterinélour relijiel er c'heñver-se. 'Contre-réforme', ur gronnad anterinélour ha riezélour gall, er c'hontrol, a ra - tost-da-vat, gourc'hemennoù d'ar glevgadour dre m'en deus enebet ouzh 'gourzhtroerezh' ar c'hweluniad Solidarnosc ha dalc'het an urzh er gevredigezh ; e soñj ar re-mañ ezeourpoent-mat evit Jaruzelski, bezañ a orin noblañs ha bezañ bet stummet a-vihanik en un doare 'hengounel'. Er skrid hon eus bet tro da lenne reer folklor eus an oferennoù a zo bet lidet evit an ec'hwelierion ha tamall a reer da Walesa chom hep kin-nig d'e genvicherourion ur steuñv politikel kristen (meneg ebet gant ar stourmer-mañ a loeziñ lezennoù digristen zo, evel hini ar sioc'hanañ a zo e talvoud du-se evel e nouspet Riez er Reter koulz hag er C'hornog ; ha meneg ebet gantañ eus kelen-nadurezh kevredel an Iliz ; gwir eo ez eo ar Stad du-se perc'henn ha Mestr diharz an armerzh : sed an tamalloù a reer dezhañ.)

Dre linenn bolitikel ivez ez eo bet degaset stolloù anterinélour riezélour gall (bodet en-dro da'r c'helaouennoù 'Itinéraires' pe 'Présent') da gemer un emzalc'h diac'hinek en arvell a zo oc'h enebañ Breizh-Veur ouzh Arc'hantina e sigur an Inizi Malvinat, a-du gant Arc'hantina, peurgent, un emzalc'h damheñvel a-benn ar fin ouzh hini Soviediz a harp ivez savboent Arc'hantiniz. Gwir eo o deus ar re-mañ rentet servij d'ar Rusianed o pourchas bitailh d'o riez davare kantgadadurioù an Amerikaned divizet ganto da gefiver kenstok Afganistan ha taolstrap Polonia.

Moarvat, en triwech'het kantved e oa bet degaset ivez anterinélourion an amzer-se - ar Jañzenidi - dre gas ouzh Roma ha dre c'hallikanouriezh da sevel a-du gant ar 'filozofed' peurgent er 'Parlamantoù' ; en Aostria ivez e oa aet ar Jañzenidi war sikour ar Jozefidi, a-du gant reoladur ar Stad war an Iliz, dre gas bepred ouzh Roma. Pezh a ziskouez ez eo diaes bezañ 'katolik' ha chom serret e-barzh 'geto' ur riez bennak, ha n'eus muñ netra kristen enni abaoe pell.

=====

JIL EWAN

BREZHONEG STUDI

STER HENGOUNEL AN TRESOLWEZADUR

Re bouezus eo kudenn gouezvoud gwerc'hel an Tiern Jezuz dindan spesoù ar bara hag ar gwin, evit ma tremenjemp hep klask endonaf* seurt kelennadurezh hervez ar ster hengounel emañ Roma bepred o reiñ d'an tresolwezadur.

Setu perak, kent mont larkoc'h da brederiañ war arvezioù all da Gerrin an Aoter, e kav din e tlean c'hoazh klokaat va fennad agentel 'An Hegaristiezh ha Gouezvoud ar C'hrist' gant ur plaenadur arbennik o tennañ da frammadur ur gelennadurezh diwanet di-ouzh labourioù Goursened Trenta, anezhañ ar vodadeg -Iliz kevangorel* nemeti bet, abaoe ar Grennamzer, o tevedañ* war gement kraf diwar-benn an Hegaristiezh.

Gwelout a raimp e skeud hevelep studienn penaos he deus emdroet kudenn ar Gouezvoud Gwerc'hel war hed ar c'hantvedoù. Daoust ha dalc'het e vo kont avat eus preder lod feizoniourion hiziv an deiz evit kantgadiñ* lunanvadurioù* nevez? N'ouzer ket. Forzh penaos, evel ma lavaren e korf va skrid diwezhañ, ret e vije d'ar Pab bodañ da gentañ ur Goursened kelennadurel evit kemer, diouzh ezhomm, diferadennoù nevez. Va c'hredenn startañ din avat eo ne c'hallo biken ar feiz wirion e seurt keñver mont war laoskaat.

Plaenadur damkanel*

Stank eo, war dachenn ar poell-den, ar c'hudennoù a weler o sevel da heul hini ar Gouezvoud Gwerc'hel dindan anadoù ar bara hag ar gwin hegaristiel. Seurt bongoel* a vez oc'h enderc'hel lod emplegadurioù* kelennadurel bet diferet war o divoud gant an Iliz, evel da skouer an tresolwezadur ha trebad* ar spesoù arouestlet war-lerc'h an oferenn. Hevelep krefen e vez kalz Kristenion Adaozat, o tabutal c'hoazh hiziv an deiz diwar o fenn. Rak, evel dres, nec'haller ket chom hep ober ar goulenn : penaos e tremen an traoù? Pe c'hoazh: petra fell d'an Iliz lavarout ent resis gant hevelep kelennadurezh ? Pezh a ro tu d'ar feizoniour da studiañ donoc'h ar c'hudennoù da heul emañ o vont da blaenaat :

- 1) war-lerc'h ar Gorreoù, e kaver sevenet war an aoter, gouezvoud gwirion gwerc'hel ha solwezel korf ha gwad ar C'hrist, dindan spesoù ar bara hag ar gwin, ene ha douvelezh an Arloz o vezañ erouez dre gevambroug* ;
- 2) solwezoù ar bara hag ar gwin a vez kemmet en holl d'an holl e solwezoù korf ha gwad ar C'hrist diwar-bouez tresolwezadur.
- 3) gant an tresolwezadur ne vez degaset kemm ebet e spesoù ar bara hag ar gwin, dre ma chomont ar pezh ez int, kollet ganto razh o solwez ;
- 4) erouez e vez ar C'hrist dindan ar spesoù, e reizh* ur solwez, hag Eñ o venel eno, kevan* en diabezh* hag e pep lodenn, keit ha ma vez ar spesoù int o-unan o trebadout.

1.-War-lerc'h ar gorreoù e kaver sevenet war an aoter Gouezvoud Gwirion, Gwerc'hel ha Solwezel Korf ha Gwad ar C'hrist dindan spesoù ar bara hag ar gwin, ene ha douvelezh an Arloz o vezañ

erouez dre gevambroug.

A feiz eo seurt lunanvadur en e bezh, soliet maz eo war gelennadurezh Goursened Trenta bepred e talvoud.

a) Gouezvoud ar C'hrist n'eus ket anezhañ unan leterc'hadek*, hogen unan gwirion, gwerc'hel ha solwezel.

Sterioù disheñvel a vez gant an droienn bezañ erouez, rak bez' e c'hall un den bennak, da skouer, bezañ erouez da'm spered, hep ma vefe gwerc'hel, na diwar-henn, gwirion, hevelep gouezvoud. An ergorenn werc'hela vez tizhet neuze gant va spered, ne vez anezhi nemet un eñvoradenn, ur faltaziadenn, na mui na maes. N'eo seurt gouezvoud nemet an hini a vez enstag, lakaomp, ouzh ur skeudenn bennak pe, c'hoazh, ouzh un degounadenn da geñver un diviz etre keneiled. N'eus aze nemet erouezded diwar-bouez arouez ('in signo'), dres evel ma kred da lod Kalvinourion, pa lavaront e vez lid ar Goan Ziwezhañ hag ar C'Hedunadur o vroudañ o feiz gant kement a nerzh ma vezont oc'h erouesaat* an Arloz dirak selloù o spered. Ha koulskoude ne vez ket Jezuz eno e gwirionez, eme Galvin, dre ma n'eus ken dezhañ nemet an neñv da chomadur.

Hogen bez' ez eus traoù a vez broudusoc'h c'hoazh da spered an den : da skouer, ur prof kaset dimp a vez o tougen betek ennomp karadegezh an hini a fell dezhañ bezañ mat en hon c'heñver hag oc'h atizañ en hon c'hreiz karadegezh kevateb*. Karantez ar profour, testeniet gant ar prof, a vez o werediñ diwar-bouez hemañ. Ha heñvel a-walc'h e vez ar gont, eme Galvin adarre - gant gouezvoud e galloud ('in virtute') an Arloz e par an Hegaristiezh.

b) Gwirion ha gwerc'hel eo gouezvoud hegaristiel ar C'Hrist.

Diforc'h eo ster ar gouezvoud gwirion diouzh hini ar gouezvoud letarc'hadek, o vezañ maz eo

krefivoc'h ha ma vez o verkañ tostidigezh, eleze nester etre boudoù gwerc'hel e par an amzer hag an egor. Hogen ret eo diwall ivez da sellout ar gouezvoud evel un dra danvezel da gentañ paz eo speredel araok pep tra. Da skouer, n'eus ket tu da lavarout e vefe kederouez* mein ar mogerioù na, zoken, tud an engroezioù pa ne gaver nester ebet etrezo e par ar spered. N'eus ket tu da gaout gouezvoud hep emell ar spered hag an emskiant. Hogen ret eo anzav ivez ne vo ket gwirion hemañ kennebeut, zoken etre hinidenion*, keit ha ma ray diouer dezhañ un*izegad nester e par an amzer hag an egor.

Ken risklus e vefe enta lemel he danvezelled digant erouezded ar C'Hrist e Kerrin an Aoter ha ma vefe lemel diganti he speredelled, rak ken bras ha ken pouezus eo an nester a vez merket dimp, e par an amzer hag an egor, gantkorf ha gwad an Hegaristiezh, ma fell d'an Arloz e vefent euvret ganimp evel boued ha died dindan spesoù ar bara hag ar gwin.

c'h) Gouezvoud hegaristiel ar C'Hrist n'eo ket unan gweredidik* hepken an hini eo, hogen unan solwezel.

Gant ar gouezvoud gweredidik nemetañ n'eo ket ret d'an hini a wered bezañ erouez nag ent korfel nag ent solwezel : da skouer, Jezuz o pareañ mevel ar c'hantener. N'emañ ket an Arloz e-kichen ar c'hlañfour ha koulskoude dre wered e c'halloud, setu ma weler ar mevel o sevel yac'h ha dibistig. Gouezvoud gweredidik Hon Salver zo bet a-walc'h enta evit seveniñ ar burzhud. Heñvelgont evit ar c'herrinoù all. Mar kemeromp da skouer ar Vadeziant e welomp ne vez ket erouez an Arloz aze nag ent korfel nag ent solwezel evit hadañ ennomp egin ar yonidigezh* hag ar silvidigezh dre werc'h an dour hag ar Spered Glan. N'eus amañ adarre gant Jezuz nemet gouezvoud gweredidik. E par an Hegaristiezh avat ez eo disheñvel an traoù. Solwezel eo eno

gouezvoud ar C'Hrist. An dended bet sammet gantañ, hag ensezet d'an ampoent e klod an neñv, a vez o tistreiñ betek ennomp e par an amzer hag an egor, naren en he stumm diles, hogen e stumm ur boued hag un died graet da vout euvret ganimp. Solwezel eo neuze seurt gouezvoud ha n'eo ket gweredidik hepken. N'eo ket dre berzh e c'halloud-santelâat nemetañ e vez erouez an Tiern amañ. E vout kevan, denel ha douevel, eo a gaver dindan ar spesoù kerinel e stumm boued ha died : solwez ar bara hag ar gwin kemmet e solwez e greud hag e wad.

d) En e bezh e vez erouez ar C'hrist dindan an daou spes hegaristiel hag e pep lodenn eus an eil spes hag egile.

Petra bennak ma vez rannet ar gwad diouzh ar c'horf war an aoter, pezh a dalv da verkañ MARV hag aberzh an Tiern bremañ bev da viken c'honvat evel Dasorc'had, n'eo ket gwad marv, anat an dra da bep feizad ab holl viskoazh ! - n'eo ket gwad a vefe goullonderet eus pep denelezh vev ha pep douevelezh an hini eo a vez neuze dirazomp. Lec'h ma vez e wad e vez ivez war un dro, na petra, buhez ha boud kevan an Den-Doue. Hag o c'havout a reer betek e pep lodenn eus an eil spes hag egile. Rak, pa vezer oc'h euvriñ ar C'Hrist diwar-bouez kedu-nadur hegaristiel, - pe dindan an eil spes e ve pe dindan egile, ne vern enta, - n'eo ket un tamm hepken eus denelezh ha douevelezh an Arloz e vezer neuze o tegemer, hogen e vout adarre en e bezh. Amoet e vefe poellata en un doare diac'hinel, rak, o vezañ ma vez erouez Krist an Hegaristiezh en e bezh e par an holl gedunerion hag e par pep unan anezho, o vezañ ma tiskenn en e bezh enta e kreiz ar c'heduner pa vez hemañ oc'h euvriñ ar spes-mañ-spès, e tleer dezren* en e gaver en e bezh ivez e par kement darnig eus ar spes-mañ-spès. Atodomp c'hoazh e vez al lodenoù, pe vras pe vihan e ve-

fent, oc'h enderc'hel an hevelep burzhud ha, diwar-henn, an hevelep galloudegezh. N'eo ket ar c'hemmentad enta, hogen ar c'halloudegezh an hini eo a vez o reiñ o gwerc'h d'ar spesoù arouestlet. Ha peogwir ne vez liammetkevanded voud an Arloz nag ouzh hennad* ar c'horf nag ouzh hennad ar gwad, na kennebeut ouzh ar c'hemmentad anezho, e vez trawalc'h an disterañ bruzunenn vara pe an disterañ takenn win arouestlet evit reiñ dimp ar C'Hrist en e gevanroez hag ar c'herrin en e wirionez.

e) Dre gevambroug e vez erouez ene ha douevelezh an Arloz.

Da geñver arouestlidigezh ar spesoù dre hini ne vez ket erouez holl barzhioù* boud ar C'Hrist en hevelep doare. Lod parzhioù a vez 'vi verborum' (dre nerzh ar c'homzoù) ha lod all 'per concomitantiam' (dre gevambroug). Pa lavar Jezuz 'hemañ eo va c'horf', e teu ar bara da vezañ e gorf 'vi verborum'. Hogen 'per concomitantiam' eo e teu seurt korf da vezañ annezet ivez war an taol gant gwad, ene ha douevelezh an hevelep Jezuz. Evit meizañ gwelloc'h an dra, n'eus nemet kemer ar skouer da heul : pa lavaran d'ur bugel azezet e penn pellañ ar sal-skol, ha me er penn all, reiñ din e zorn, e vo ret dezhañ, evit sentiñ ouzhin, dont betek ennon gant e hinidended en he fezh, sev ent korfel hag ent speredel war un dro. Tu zo neuze da lavarout e vez ar bugel o reiñ din e zorn 'vi verborum', an nemorant o vont da heul 'per concomitantiam', dre gevambroug. Hag evit a sell ouzh arouestlidigezh ar gwin e c'haller poellata en un doare heñvel.

II

Solwezoù ar bara hag ar gwin
a vez kemmet
en holl d'an holl

e solwezoù korf ha gwad
ar C'Hrist
diwar-bouez tresolwezadur

Kudenn ar solwez ha, da heul, hini an tresolwezadur zo pennealioù bet darbennet gant an Iliz war-lerc'h imbrouderezh hir gwechall war dachenn ar brederouriezh. Gwelet hon eus gant ar studienn agentel penaos e klask bremañ lod feizoniourion deveizañ kudenn an tresolwezadur e doareoù disheñvel, pa sellont evel dispredet ha koshaet ar pennonioù aristotelat o deus talvezet da soliañ diferadennoù an Iliz e par ar solwez hag an darvoudennoù. Ret eo bremañ, emezo, kinnig displegadurioù all.

Diaester ar gudenn

An diaester a zo gant seurt kudenn zo moarvat da lakaat e devoud an doare maz omp-ni, tud ar bed arnevez, deuet da faltaziañ keal prederouriel ar solwez dindan levezon ar skiantoù resis. Rak anat eo e vezomp techet da gantvout* seurt keal gant lagad ar gouezoniour*na wel an traoù nemet e stern e dachenn a zo hini ar skiantoù kantouezel*. Ganto ne wel ar gouezoniour nemet tolzoù, gremmoù hag, evitañ, ne dalv ket ar boan turiañ donoc'h keal ar solwez evit klask traoù all. Diwar-henn ne vez morse preder ar gouezoniour o trevonnañ* tachenn ar pezh a zo bet anvet 'darvoudenn'* gant ar Skolasteged. Dont a ra neuze keal ar solwez da vezañ heñvelster da hini darvoudenn. Ha sed aze un droukvesk spontus a ranker lakaat war wel kent mont larkoc'h gant studi an tresolwezadur, rak aze emañ diaester ar gudenn e gwirionez ha n'eo ket e lec'h all.

Ur c'hemm o tennañ da
hennad na traoù hag o

lezel digemm an anadoù.

Displeget em eus e korf ar pennad agentel perak e raen gant ar ger diwar 'solwez', 'substantia', anezhañ ur ger a gemero kalz pouezegezh adalek an henamzer. Talvout a ra da verkañ strad ar boud a vez o kemmañ e par an Hegaristiezh, an trobenn tre o livañ ivez ar c'hemmadur evel meta e gresianeg. Hemañ avat n'eo ket ur c'hemmadur diwar c'horre an hini eo, hogen unan o tizhout ar boud hag o c'horren zoken an dra gemmet war ul live trehontel* : Korf ha Gwad uhelbriz an Dasorc'had ! Gant an tre brezhonek, resisoc'h moarvat eget an trans latinek e veneger ar burzhud maz eo kemmadur ar spesoù o tremen en un doare diwar o live bedel war o live trabedel*, eleze trehontel. Mat-kenañ eo neuze un termen evel 'tresolwezadur'.

Gwelomp bremañ petra fell d'an Iliz lavarout ent pleustrel gant seurt anvad.

Kent an Arouestlidigezh, da geñver ar Gorreoù, ne vez war an aoter netra nemet bara ha gwin boutin. Da c'houde, bennozha da c'halloud gweredidik ar c'homzoù arouestlus o seveniñ pezh a vez aroueziet ganto, danvezioù o tremen bepred evidon da vara ha da win, pa sellan outo gant va foell-den, ne vez ken anezho e gwirionez na bara na gwin, hogen korf ha gwad ar C'Hrist, eleze an denezlezh santel savet bremañ gant an Arloz e klod an nefvoù goude bezañ talvezet dezhañ da gas da benn silvidigezh ar bed.

Ur c'hemmadur boniek*, hogen kevrinus, diazezet hepken war ar feiz a vagan e komzoù Mab Doue, zo c'hoarvezet war an aoter : kemmadur solwez ar bara hag ar gwin e solwez korf ha gwad ar C'Hrist.

Daoust hag-eñ n'eus ket tu koulskoude da veizañ e c'hallfe korf ha gwad ar C'Hrist kenvezout gant ar spesoù ? Henezh eo mennoz Luther bet nac'het gant an Iliz, o vezañ ma kollje ar c'homzoù arou-

estlus o ster gwirion, lakaet e vije gwir hevelep dodenn*. Rak, pa lavar ar beleg : 'Hemañ eo va c'horf', ne c'hall ket ar ger 'hemañ' menegiñ solwez ar bara ha solwez korf ar C'Hrist war un dro, nemet e ve diwar-bouez leterc'had* hag arouez, dodenn dizarbennet ivez gant an Iliz. Neuze, mar n'eus dindan ar solwez nep haenad* all, e tleer sellout outañ evel an ishaen* diwezhañ nemetañ, pezh a dalv da lavarout ne c'haller ket kaout div ishaen diwezhañ d'ur boud bennak. Diwar-henn e tleer deveizañ komzoù ar C'Hrist evel-henn : " 'Hemañ' emaooc'h bremañ o welout hag a c'hallfe bezañ bara ivez n'eus mui bara anezhañ e devoud ; 'hemañ' eo va c'horf, e pep gwirionez."

III

Gant an tresolwezadur ne vez degaset kemm ebet e spesoù ar bara hag gwin, dre ma chomont ar pezh a vezont, kollet ganto koulskoude razz o solwez.

N'eo ket ret kaout ar feiz, ha n'eus nemet darnodiñ* d'ober evit gwelout e trebad anadoù ar bara hag ar gwin war-lerc'h ar Gorreoù. Holl ar pezh a c'haller darnodiñ dre hentenoù boutin pe skiantel e par ar bara hag ar gwin, a van digemm, evel ar c'hementad, gant an tolz, an egorelezh*, ar stumm, ar c'haleter, al liv, ar blaz h.a. Evit lagad ar gouezoniour enta ne c'hoarvez kemm ebet e frammadur diabarzh ar solwezoù bet aet d'ober ar bara hag ar gwin. N'eus bet elfenn ebet o fiñval. E pep mare e c'hallfe moarvat ar gremmoù enkelat*bet aet d'ober danvez ar bara hag ar gwin kregiñ da wereidiñ* adarre. Ha sed a reont, evit ac'hano, kerkent ha ma vez bodet an ampegadoù* ret e seurt keñver. Rak, ur wech euvret, e rank ivez ar barahegaris-

tiel tremen dre gelc'htro ar c'hemmadennoù a zo lod kement boued a zo.

Kaer e vez ober : netra na seurt ebet ne vez diguzhet o vont gant hent an imbourc'h darnodel*. Ha padal e vez ar feiz o tiskuliañ din ez eus c'hoarvezet un nevezinti' varzhus : ar bara, sev ar werc'henn* emañ an holl amparadoù* merzhidik* usveneget anezhi o terc'hel da bouezañ war va sennoeroù* ha, dre o hantererezh, war va seiz-den, seurt bara zo bremañ steuziet, ha ne chom war e lerc'h nemet ar pezh a vez ar brederourion oc'h ober 'darvoudennoù' anezhañ. Setu m'emaomp neuze adarre dirak kevrin ar feiz : darvoudennoù ar bara o trebadout hep sintr* ar bara, hep gouateg* ar solwez anezhañ. Hag arabat krediñ e vefe deuet seurt darvoudennoù da vezañ reoù korf ar C'Hrist dre werc'h an tresolwezadur. Nann, derc'hel a reont da rediañ an den a vez ouzh o darnodiñ da honniñ * : 'bara eo', petra bennak m'en rediont ivez da youc'hal, p'en deus ar feiz : "Korf ar C'Hrist an hini eo !"

Penaos e c'hall darvoudennoù ar bara menel e seurt giz hep sintr, hep gouateg, hep dangorenn* ebet, ha goude maz eo dres a-walc'h hennad an darvoudenn, dre dermenadur, gougevanif ouzh he dangorenn ?

Diwar-bouez an dezrann drabedoniel* a reont eus ar veziadelezh* eo e vez ar feizoniourion o respont da seurt kudenn. Ne vez ket enstag, emezo, kement darvoudenn a zo, dre heñvel benn*, ouzh o solwez. Hag e par ar solwezoù danvezel e kaver unan diazezekoc'h eget ar re all : ar c'hementad an hini eo. Dalc'hmat e vez ar c'hementad o pegañ ouzh an danvez evel ouzh e c'hlad. N'o devez an darvoudennoù all liamm ebet gant nep solwez fetis nemet ha dre hantererezh ar c'hementad e ve, hemañ o talvout evel kentañ gouateg dezho. Ha sed amañ penaos e c'hoarvez d'ar c'hementad dont, dre vur-

zhud, da c'hoari roll ar solwez, da geñver an tresolwezadur : pa vez kemmet solwezoù ar spesoù hegaristiel en o fezh e solwezoù korf ha gwad ar C'Hrist, e vez Doue o vastañ war an hevelep tro da gementadoù ar bara hag ar gwin ar bezoud o devoa dre benn o solwezoù kent. Ha gant ar bezoud e vez ardaolet* ivez war ar c'hementadoù holl berzhioù ha kennezvoù* ar bara hag ar gwin.

En ur ger, ken bras e teu neuze talvoudekadur ar c'hementad da vezañ, ma vez en holl d'an holl o c'hoari roll ar solwez.

Pep displegadenn avat a vez o tegas ganti ur gudenn nevez. Penaos, da skouer, e c'hall ar C'Hrist, evel solwez ur c'horf speredel, dont da chom dindan darvoudennoù danvezel ?

IV

Erouez e vez ar C'Hrist
dindan ar spesoù,
e reizh ur solwez,
hag eñ o venel eno
kevan en diabezh hag e pep lodenn,
keit ha ma vez ar spesoù
int o-unan o trebadout.

Ne vez ket lec'hel amañ gouezvoud ar C'Hrist. Gant gerioù all, ne vez erouez an Arloz dindan ar spesoù nemet e reizh ur solwez. Gwerc'hel ha solwezel e vez gouezvoud ar C'Hrist, seurt gouezvoud o vont gant hini ar spesoù, petra bennak ma ne vez ket lec'hel. Penaos e tleer deveizañ un dodenn evel hounnezh, pa hañval bezañ dislavarek evit ur gwel ?

Lerc'h ur werc'henn gorfel bennak eo gorreenn* ziabarzh ar c'horf amezat* sko outi. Da skouer, tu diabarzh ar werenn eo lec'h an dour endalc'het ganti. Delec'hiet* e vez ur c'horf bennak neuze

diwar-bouez e gementad mentel. Delec'hiet e vez, dre ma vez o kargañ ul lec'h gant e ledad*. Setu perak ne c'haller ket delec'hiañ boudoù digorf evel an aelez, lakaomp, rak, dre ma n'o deus korf ebet, n'o deus lec'h ebet kennebeut.

Moarvat o vezañ maz eus anezhañ ur c'horf gant e ventadurioù, e tlefe korf ar C'Hrist bezañ delec'hiet ivez tu bennak. Hogen 'tu bennak' amañ zo un droienn* n'he deus netra da welout gant ar bed ma vevomp ennañ. Hemañ n'emañ an Arloz na tost na pell dioutañ. N'en deus darempred ebet gantañ. Da geñver ar Gorreoù hag an Arouestlidigezh, e teu ar C'Hrist da vezañ erouez 'tu bennak', hep bezañ erouez hervez ur gouezvoud lec'hel, eleze hervez an doare bet displeget uheloc'h. Gant gerioù all, ret e vefe dezhañ kargañ gant e ventadurioù al lec'h m'emañ ennañ. Rankout a rafe tennañ e ventadurioù diouzh al lec'h m'emañ evit derc'hel ul lec'h all ha reoù all niverus elveltañ. Mar bije da vezañ delec'hiet, e rankfe koazhañ* e ventadurioù da reoù an ostiv, da skouer, ha mont betek kemer ar stumm anezhañ, pezh a zo faltazi diskiant.

N'eo ket e seurt giz avat emañ seurt traoù da vezañ deveizet. Gouezvoud ar C'Hrist amañ n'eo ket unan lec'hel an hini eo, sev unan e reizh ar c'he-mentad ('per modum quantitatis'), unan e reizh ur solwez ('per modum substantiae'), ne lavaran ket.

A-raok an Arouestlidigezh, e oa erouez solwez ar bara e stern al lec'h ma kaver an ostiv, diwar-bouez mentadurioù hemañ. Ha mentadurioù an ostiv oa ivez reoù solwez ar bara. Ur wech troet e solwez korf ar C'Hrist, e teu hemañ ivez da vezañ erouez e stern an hevelep lec'h, ket koulskoude diwar-bouez mentadurioù a vije diles dezhañ, hogen diwar-bouez reoù ar bara hag i chomet divoulc'h. An trevell-delec'hiañ bet kefleuniet gant mentadurioù ar bara, e gounid hemañ, zo c'hoazh kefleuniet gant an hevelep mentadurioù, hogen e gounid

korf ar C'Hrist ar wech-mañ. Emañ korf ar C'Hrist neuze e stern an un* lec'h ha hini spes ar bara, hogen diwar-bouez mentadurioù a zo hag a van estren dezhañ. Morse ne vezont koazhet da ventadurioù un ostiv dezhañ ment ur pezh-moneiz.

Taolomp evezh c'hoazh ouzh un arvez all d'ar gudenn : lavarout e vez ur c'horf bennak en ul lec'h merket, zo lavarout e vez o kargañ lod pe lod eus al lec'h gant lod pe lod anezhañ evel korf. An tu-mañ gant an darn-mañ, un tu all gant un darn all. En eneb, solwez kevan ur c'horf bennak zo dezhañ da lec'h, neket hepken ar c'horf en e bezh, hogen pep darnanezhañ ivez. Hag e seurt giz emañ kont gant korf hegaristiel ar C'Hrist. Ken, pa vruzuner un ostiv bennak, e lieskementer gouezvoud korf an Arloz diouzh niver ar bruzunennoù a reer.

Arabat krediñ evelkent e vefe anaezet* korf ar C'Hrist gant seurt lieskementadur. Rak c'hoarvezout a ra gantañ evel gant an heol : n'eo ket peogwir e vez paket e sklerijenn gant bordilh hon meleziourioù dimp, amañ war an douar, m'en dije hennezh da c'houzañv diwar se.

Gwazh ne vez ket korf ar C'Hrist kennebeut eus an droug a c'hoarvez gwech an amzer gant un ostiv bennak. Arabat lezel hon faltazi da gantren betek re. Ar pezh a c'hoarvez, e mad pe fall, gant un ostiv, ne ra netra da gorf an Tiern. Ha seveniñ un disnevetad* ouzh an ostiv pe ar gwin arouestlet ne dizh tamm ebet nag ar c'horf nag ar gwad santel, petra bennak ma vez dismegañset evelkent hinienn dendouevel Jezuz-Krist, peogwir e klask neuze an disnevetaer* diskouez e gasoni en e geñver. Heñvel e vez an traoù ivez e degont ar pec'her a vez o vont da geduniñ e stad a bec'hed marvel.

Erouez e vez ar C'Hrist
e par an Hagaristiezh

keit ha ma vez ar spesoù
int o-unan o trebadout.

Bez' e vez ar spesoù o trebadout keit ha ma
chomont hep displeberañ, da lavarout eo, hep lizañ
gant an amzer, pe c'hoazh hep teuzifi diwar euvri-
digezh pa geduner. E-giz-all e steuz kercent pep
gouezvoud santel, peogwir ne c'hall emro an Arloz
mont nemet gant anadoù ar bara hag ar gwin, danve-
zioù bet dibabet gantañ da sevel ar C'Herrin. Keit
ha ma ne c'hoarvez dazgwered kimiel ebet ebet enta
e chom bara ar bara ha gwin ar gwin. Hemañ eo ivez
savlec'h Tomaz AKUINO. Ha seurt dazgwered n'eus
ket anezhañ evel dres e degont un ostiv pe ur
c'hopad gwin arouestlet a vije bet saotret, la-
kaomp, ha deuet diwar se da vezañ amzere ouzh pep
euvridigezh, rak e-keñver darnoderezh e chom an
ostiv bara ha gwin endalc'had ar c'hopad.

PENGENNADUR

Lavaromp evit pengenniñ ne vo biken dirouestlet
ganimp amañ war an douar kudenn ar Gouezvoud Hega-
ristiel, petra bennak ma tleomp koulskoude lakaat
hon reiz da labourat ma fell dimp hepkoriñ* pep
faltaziach o klask dizoleiñ pezh n'eus ket ane-
zhañ. Rak ret eo soñjal ervat atav n'eo ket an
tresolwezadur un tremen eus stad ur boud kor-
fel da hini ur boud korfel all. Korf ar C'Hrist
n'emañ ken bremañ e dalc'h ar bed ma vevomp ennañ.
Eñ eo kentañ maen AR BED NEVEZ a c'hortozomp. Seurt
korf n'en deus mui netra da welout gant ar greude-
lezh* evel ma vez Sant Paol o kelenn pa vez oc'h
ober 'ur c'horf speredel' anezhañ. Hag an dreuer-
c'helezh* am eus graet meneg anezhi em skrid
diwezhañ eo domani ar seurt korf speredel.
Setu neuze peadra da reiñ da gudenn an tresolweza-
dur un odol* hep e bar. Bennozh dezhañ e weler

boudelezh* krouet, boudelezh vresk ha blin ar bed
kozh o tont da berzhiañ e gwerc'helezh ar bed
nevez, sev en dreuerc'helezh. Gant an tresolweza-
dur hegaristiel eo Rouantelezh Doue en he beziade-
lezh fetis a vez o tedarzhañ war hon douar, eo an
dazoned a vez o ragampoentañ* an erouezvezh*.

JIL EWAN

+++++

Herve LANNDIERN

KELC'H KELTIEK ROAZHON

E 1932, ur Breizhuhelad eus an 'diavaez -bro', Eugène Régner, a oa en em dennet e Roazhon goude bezañ bevet e-pad bloavezhioù hir en harlu e Pariz e-lec'h en doa renet e-pad pell amzer an hini kentañ eus ar "c'helc'hioù keltiek", a sav ul laz-kanañ a gemer da anv "Kanerien Breiz" ha fiziout a ra ar renerezh anezhañ d'ar Mestr Collin, sonaozour, hag ograouer iliz an Itron-Varia. Gouest e oa al laz-kanañ-se da ginnig un abadenn a-raok fin ar bloaz. D'ar mare-se e oa bet krouet ur rummad kentelioù brezhoneg. Evitañ da vezañ genidik eus Breizh-Uhel en devoa Eugène Régner desket ar yezh hag heuliet en devoa zoken kentelioù kembraeg - hag iwerzhoneg war ar marc'had - er Sorbonne.

Adal ar bloaz war-lerc'h e voe roet lusk d'ar stroll nevez gant Cairou o tegouezhout. Hemañ a oa 'enseller ar Postoù' ha genidik e oa eus Korle ; dre se ivez ez anaveze mat-kenañ an dañsoù breizhek. Bez' e oa anezhañ ivez ur c'helenner eus ar c'hentañ, dezhañ a-hend-allur skiantdrenatur eus an arvestaozerezh. A-barzh pell enta en devoa lakaet en e blom ur gevrenn goroll a voe anvet 'Korollen Roazon' a voe brudet adal an deroù. E 1933 e kemero an teir c'hevrenn-se an anv a 'gKelc'h keltiek Roazon' ('Cercle Celtique de Rennes' a vo de-

zhañ da c'her-stur goude ar brezel "Me a zalc'ho". Bezet pe vezet, bez' e vo Kelc'h Keltiek Roazhon an hini kentañ el ledenez-mañ.

Diwar neuze ez ay ar C'helc'h war greskiñ da vat ha perzh a gemero e gouelioù niverus e rannbarzh Roazhon ha, dizale, en tu-hont da harzoù ar rannbarzh-se.

E 1934 e voe krouet kevrenn ar gouren ; e 1938 ez eo enrollet un abadenn gant al laz-kanañ e skignlec'h 'Roazhon-Breizh' evit ar wech kentañ.

Eugène Cairou a oa ur brezhoneger eus an dibab hag, ivez, ur Breizhad a galon. Eus e gelc'h e ray ur gwir greizenn a azginivelezh evit ar sevenadur broadel ha n'eo ket - hep muiken - ur gronnad a zañserion hag a ganerion dic'hizet. Rediet eo pep ezel da studiañ ar yezh, a bennaenn, da vihanañ, hag Eugène Cairou a raio bec'h e-unan : bez' ez eo bet va c'hentañ kelenner brezhoneg (a-gevret gant Alan ar Berr, ar Gwaienad) hag an dra-se ne vo disoñjet biken ganin-me.

E-pad ar brezel e teuio ar C'helc'h da vezañ ul lec'h-kejañ evit brezhonegerion Roazhon, ha bod a roio en e lann d'ar 'Skol-Uhel Emil-Ernod', kado-riet gant Roparz Hemon.

Broudet e voe an izili ivez da zeskiñ an istor. Aozet e voe ur rummad prezegennoù war destennoù o tennañ da Vreizh. Un niver bras a benntudennoù eus ar mare-se a gemeras perzh er rummad prezegennoù-se : Yann Fouere, diazezer "Ar brezhoneg er Skol", Roparz Hemon, Yves Creston hag e vignon, Youenn Drezen, Arzel Even, Meavenn.

Pa rankas Eugène Cairou dilezel renerezh ar C'helc'h keltiek (amsavet e vo gant René Tanguy) en devo lakaet e siell war stummadur brezhon ur remdeziad a vrogarourion a vo bet tizhet gant skog e bersonelezh. D'ar yaouankizoù bet stummet gantañ end-eeun n'en devo ket desket hepken ur c'halveze-

rezh bennak : atizet en deus en o c'halon ar garrantez evit ar vammvro vreizhat ; ar remziad a vo tremenet dre e galc'h enta ne oa ket anezhañ ur remziad a zañserion, traken !

E-touez izili kozh ar C'helc'h e vo kavet a-c'houdevezh meur a hini a vo e penn an obererezhioù brogar el ledenez-mañ, war dachenn ar politikerezh pe ar sevenadur : kadoriad "Bodadeg ar Sonerion", hini "Mirva Sonerezh an Oriant" ; hag ivez, skrivagnerion evel Youenn Olier ha Per Denez. Pezh a ziskleir ivez levezon vras ar C'helc'h - bet stummet gantañ ouzhpenn tri-mil stourmer brezhon - eo moarvat orin e izili : bez' e oa anezho, evit un darn vras, studierion en un amzer ma oa Skol-Veur Roazhon an hini nemeti e Breizh, betek nevez zo. Holl yaouankizoù Breizh a geje eno.

E 1944, pa voe fin d'ar mac'homerezh dall (ken ez ejod betek herzel lod eus e renerion : kement a oa breizhat a ranke mont da get, 'keta!), ez adkrogo ar C'helc'h keltiek da greskiñ bepred buanoc'h, o tennañ mad - en un doare iskis a-walc'h - eus an difenn a oa a ren nep obererezh politikel brezhon, ken e troio kalz eus e izili war-du an obererezh sevenadurel. Dont a ray ar C'helc'h da vezañ ul lec'h-kenemgav, ul lec'h-kejañ, e-lec'h en em voder evit kaout keloù diwar-benn ar vignoned steuziet pe skignet.

E 1951 e voe savet ar "Bagad Yaouankiz Vreizh", e-lec'h e tesk ar re yaouankañ eus an izili dañsal ha kanañ ; e 1953 ez eo diazezet ur stroll korolladegoù poblek, diouzh giz Europa ar C'hreiz, a raio berzh da sabatuiñ, dreist-holl e Gouelioù Kernev, e Kemper, hag e "Goueliadeg Etrevroadel ar C'han-ha-Koroll" e Roazhon. E 1958 e voe savet ar "Bagad kadoudal".

Reuziañ a reas ar C'helc'h ouzh un enkadenn e 1973 diwar-bouez ezperc'hennadur e sez, 25 straed

ar Prad-war-Laez ('Pré-Perché'), nepell diouzh kreiz-kêr Roazhon, war lez boulouard ar Frankiz. E 1977 hepken e tizho kaout, a-benn ar fin, un annez all e-lec'h an hini kozh, en atant an Harp, e rangêr Kêryann, war ribl an trobarzh-hent.

Abaoe diwezh ar brezel en deus ar C'helc'h roet abadennoù e pep lec'h, e-barzh pemzek bro a Europa - eus Iwerzhon betek Yougoslavia, o tremen dre Alamagn.

Anezhañ ur skol evit ar re a fell dezho dañsal korolloù breizhek, evit ar re a fell dezho seniñ, en em ziskouez ivez hiziv an deiz evel ur greizenn-studi evit razh hon hêrezh sevenadurel, gant prezegennoù, breutadegoù, diskouezadegoù, luc'h-skeudennaovaoù, levraoueg, plademoueg - hag ur greizenn a eskemmoù sevenadurel gant ar broioù keltiek all.

Hag eñ feal d'e c'her-stur : 'Me a zalc'ho'e ra ar c'helc'h e seizh gwellañ evit harpañ e izili da emouezañ gwelloc'h ouzh o hevelebiezh, o reiñ tro dezho da anavezout ar glad brezhon pinvidik ha da dennañ mad dioutañ, en ur greskiñ anezhañ, hag ivez da ziorren o c'harantez evit Breizh; reiñ a ra tro dezho ouzhpenn-se da skignañ en diavaez - ha pell-tre a-wechoù - an 'danvez Breizh' liesseurt.

Hogen n'eo ket bet a-walc'h d'ar C'helc'h kreskiñ ha amrizhekaat e obererezhioù ; roet en deus an tu da ziazezañ strolloù arall, evel ar gKEVRENN pe ar 'Groupe Gallo-breton', da skouer.

Kenoberiet en deus ivez da grouiñ meur a aozadur brezhon armerzhel ha politikel.

Kevredinad Armerzhel Europa he deus ur 'bagad', ur stroll dañserion, hag ur rummad kenteelioù brezhonek a zo diwanet war-eeun eus 'Kelc'h Keltiek Roazhon', ken e vefed tentet a-wechoù da ober anezhañ 'Kelc'h keltiek Breizh'. Peseurt meuleudi a c'hellfe bezañ brasoc'h ?

Herve LANNDIERN

Joseph Chardonnet

"CENNAD CATHOLIG CYMRU"

IMBOURC'H (niverenn 143-144) a zo bet kel ganti eus an TT. Trebaol ha Merour, Misionerion Oblad Mari Dinamm, e Kembre. E deroù ar c'hantved-mañ e voe gwelet mat gant an Aotrou 'n Eskob Mostyn, Eskob Menevia, na advevfe ket ar gatologiezh e Kembre, nemet gant sikour beleion oc'h anavezout yezh ar vro. Soñjal a rae e vefe aesoc'h da Vrezhoned deskiñ ar c'hembraeg. Goulenn a reas beleion digant urzh an Obladed. Labourat a rae dija Obladed iwerzhonat en eskopti evit Iwerzhoniz deuet da Vro-Gembre ; hag en urzh-se e oa meur a veleg gant e Breizh-Izel.

Setu perak e teuas daou Oblad yaouank, an TT. Trebaol (eus Plabenneg) ha Merour, d'an 28 a viz Eost 1900 da gCaergybi ('Holyhead') da zeskiñ kembraeg. Distagañ a reont o frezegenn gentañ e miz Ebrel 1901. Ha digoret e voe ar barrez kembraek d'ar c'hentañ a viz Kerzu 1901, e Llanrwst (e gwailarn ar vro), sant Tudwal o vezañ dibabet da bae-ron dezhi. War-dro 3.000 pe 4.000 a dud a oa o vevañ e kêr ; met e gwirionez e tlee labour ar visionerion bezañ astennet penn-da-benn d'ar c'hanton.

Ne voe ket graet un degemer a-zoare d'ar visionerion : kunujennoù, dismegañsoù, mein taolet gant

ar vugale, ken don e oa ar rakvarnioù a-enep d'ar "babisted". En tu-hont da se, mennoziou froudennus diwar-benn ar relijion : e Llanrwst e kaved c'hwetek chapel, pep hini gant he feiz protestant dezhi hec'h-unan (memes tra, da skouer, e Sant-Heler Jerzenez hiziv an deiz). Ret eo bezañ kadarn evit derc'hel ha kenderc'hel. N'eus forzh ! E 1903 ez eas an Tad Merourda bPwllheli, war an aod, e kreisteiz Caernarfon, da grouiñ un eil mision ; ha kaset e voe daou oblاد all, an TT. Tanter ha Breton, d'e skoazellañ.

E 1902 ne voe niveret nemet c'hwec'h parrezian oc'h ober o fask ; e 1912, hanter-kant, hag er vro e oa kustumet an dud ouzh ar visionerion. Perak ?

*** **

Dav eo klask an abeg d'ar c'hresk-se, e-touez re all, er gazetenn relijiel krouet e 1910 gant an T. Trebaol, da gentañ evit ar barrez, buan avat evit ar vro a-bezh. Deuet eo er-maez an niverenn -1- d'ar 25 a viz Eost 1910. Peder fajenn evit pep sizhun. Met a-raok dibenn ar bloavezh e teuas da vezañ miziek ha fetisoc'h war un dro. Dre se e veze pleustret war zanveziou a bep seurt.

An talbenn kentañ : Cennad Llydewig Llanrwst, da istalbenn : "The Messenger of the catholic Church", hag etre krommennoù : Cambro Breton Mission. Adal an niverenn 19 avat eo deuet da vezañ Cennad catholig Cymru, gant an istalbenn : "The little Messenger of catholic Cambria", hag ar ger-stur e brezhoneg : Evit Doue, hor bro, hon iez". Adal an niverenn 31 eo dilezet ar ger-stur brezhonek hag en e lec'h e kaver : Duwa'n Gwlad, da lavarout eo : "Doue hag hor Bro, dilezet adarre war an niverenn 37 evit : "Ein Duw, ein Gwlad, a'n Hiaith a zo da dreiñ : Hon Doue, Hor Bro hag Hor

yezh.

Resizet eo ar pal en niverenn gentañ : degas da goun d'an dud fidel o deverioù mab-den ha kristen. Kaset eo da benn ar program-se en un doare lies-seurt souezhus, mat da blijout d'al lennerion. An danvezioù ? Deskadurezh relijiel eveljust (petra krediñ ? Petra ober ?), gant notennoù a zoueoniezh hag a speredelezh (da skouer : ar sakramantoù, ar purgator h.a.) ; addisplegoù diwar-benn ar Skritur Sakr, notennoù-istor diwar-benn ar vro, sent ar vro ha testennoù o tisplegañ buhez ar Sent, meur a hini enoret e Kembre hag e Breizh... Fentus eo gouzout evel-se ez eo bet ganet Sant Padraig e... Pont-Aven !

Kavout a reer ivez pajennoù lennegel, pajennoù a yezhoniezh. Setu un dro evit an T. Trebaol da embann testennoù a himnoù, pedennoù, kantikoù, e latineg, e saozneg, e galleg, e brezhoneg, e kerneveg, gant ar bannoù tal-ouzh-tal an droidigezh e kembraeg. Dibabet ez eus bet levrioù kozh pedennoù brezhonek, - da skouer, evit letanioù ar Werc'hez Vari, anv Jezuz, ar Galon-Sakr h.a. E-touez an traoù dic'hortozet : kavout ur c'hantik Feiz kozh hon tadoù, sinet G.M. Trebaol O.M.I., hag - a-hervez - mammenn ar c'hantik brudet "Da feiz Hon Tadoù Kozh" ; da grediñ eo, diouzh ar c'hCennad, ez eo bet skrivet an destenn gentañ anezhañ e saozneg, gant an Tad Faber, ur skrivagner speredel brudet mat. Da bep hini e vad !

N'eo ket souezhus avat kavout ar 'Bro Gozh' eus Taldir hag e vammenn kembraek : "Hen Wlad fy Nhadau". Iskis a-walc'h eo avat lenn ar c'han gallek : "Minuit Chrétien" e barr e vrud d'ar mare-se, hag e droidigezh kembraek gant an Tad Trebaol.

Degemer a rae ar gelaouenn studiennoù sevenadurel, dreist-holl diwar-benn ar yezhoù keltiek, rolloù-gerioù, lakaet enno tal-ouzh-tal ar stummoù brezhonek, kembraek, saoznek hag, a-wechoù, kerne-

vek, iwerzhonek, skosek, manavek. Aes eo kompren e kaved e-touez lennerion ar c'hCennad katoliked met ivez protestanted ha, zoken, tud hep feiz. Tizhet e oa bet ar pal.

Rakwelet e oa bet gant an T. Trebaol e vije bet keinet ar c'hCennad en ul levrenn 500 pajenn, nav niverenn warn-ugent enni, adalek an hini gentañ, eus ar 25 a viz Eost 1910, betek fin ar bloavezh 1912. El levrenn gentañ ez eus un daolenn-danvez o tisplegañ, dre ar munud, endalc'h pep niverenn ha bez' ez eus ivez ur roll diouzh an destenn a zo prizius-tre evit adkavout ar c'hrafoù meret er gelaouenn. Evel-se ez eus bet savet un oberenn a dalvoudegezh vras o lakaat anat ampartiz un den uhel e skiant ha poellus e zoare-labour. Dedennus-bras eo ar pemp-kant pajennad-se evit ar furcher. Emichañs avat ne vez ket kavet al levrenn-se e Breizh.

Penaos e troas an traoù goude 1912, ken evit ar Cambro Breton Mission, ken evit ar c'hCennad Catholg Cymru ? Dav e vefe klask un diell bennak e levraoueg vroadel Aberystwyth. Hervez Lukian Raoul ("Un siècle de journalisme breton" p.614) e vez kavet anv ar c'hCennad evit ar wech diwezhañ er gelaouenn Arvorig, meurzh 1914. Galvet e voe ar visionerion en-dro da Vro-C'hall e 1914, evit ar brezel, ha da grediñ eo e voe echuet ar Vision evel-se. Bez' e oa d'ar c'houlz-se parrezioù katolik all e Kembre, nemet o vont en-dro dreist-holl evit estrenion, Iwerzhoniz peurgent. Hiziv an deiz, ul lodenn eus ar veleion iwerzhonat o deus desket kembraeg hag a c'hell ober war-dro ar Katoliked kembreat.

Joseph CHARDRONNET O.M.I.

+++++

DIWAR BENNAQUIN

gant KOZHARZH

Komzoù HTS Yann-Baol II, tennet eus an OBSERVATORE ROMANO e saozneg. (11 Genver 1982)

"Pep den en deus e zeroù e Doue ha n'eo ket hepken e korf e vamm ..." Mibion omp da Zoue enta dre anien. "Mibion ez omp da Zoue dre ar Mab..." Advibion enta pe Vibion dre adanien. "Dre ar Spered Santel a zo Spered ar Mab..." Me a gave din e oa ar Spered Santel - anezhañ trede hinienn an Dreinded - karantez ; karantez an Tad evit e Vab ha karantez ar Mab evit e Dad, ha n'eo ket hepken karantez ar Mab. "Ar Spered-Santel eo hon laka da ober eus Doue hon Tad, ha da gomz outañ evel ouzh hon Tad... Ha 'kalz tud henn gra..." (nemet en hor sevenadur greantel-maz eo trec'h an Homo Faber war an Homo Sapiens, m'eus aon !)

"Bez' ez eo dre m'hon eus ar memes Tad ez omp galvet d'ar peoc'h ; gant deiz kentañ ar bloaz e tleomp henn kounaat, ha neuze adneveziñ hor c'hoant d'ar peoc'h e tiegezh Mab-Den en e bezh..." (Un tiegezh gant un Tad).

"Ar peoc'h roet gant Doue a zo e dalc'h youl-vat pep den. En ur bed ma vez ar peoc'h en arvar... e rank pep den ober goulennoù outañ e-unan... evit krouiñ ar peoc'h-se hag a zeu diwar oberiantiz tud a zo dizalc'h o mennerezh, sturiet ma vezont gant ar poell da glask mad kement den a zo er wirionez, er reizhded hag er garantez. An urzh poellek ha divezel-se hag a zo ar peoc'h a c'hell dont hepken eus Doue. Dre an diouer a beoc'h e meur a lec'h war an douar e teu anatoc'h-anatañ ez eo ar peoc'h un dra roet gant Doue, ha setu perak e tle atav bezañ goulennet digantañ a-unvouezh, diastal ha fiziek e pep lec'h..." "Doue en deus kaset e-barzh hor c'halonoù Spered E Vab o lavarout : Tad. Evel-se, dre Zoue n'oc'h ken ur sklav met ur mab... (St-Paol, Gal.)..." "E donderioù kalon pep den e vez renet un emgann veur : ar mab a stourm ouzh ar sklav..." "An emgann-mañ a vez war un dro en Istor Mab-den war an douar. Pep den a c'hell mont da sklav e meur a zoare : pavez krennet war e frankiz... Pep den en hon amzer a vez gwasket gant ur sklavelezh o tont diwar genderc'hadoù e vezerezh hag e venne-rezh..."

A-DREUZ-LENN

Reun ar C'HALAN.- Levr ar Blanedenn.- Brest, Al Liamm, 1980.

Emaon o paouez lenn hag adlenn LEVR AR BLANEDENN, andastumad barzhonegoù a zo bet nevez embannet gant AL LIAMM. Skrivañ a ran 'lenn hag adlenn' rak al levrenn gaer-se, didro ha mistr he stumm, ne glot ket penn-da-benn gant an dornskrid a oa bet etre hon daouarn daou vloaz zo hag en doa roet an tu d'an aozer da dizhout ar 'Priz Langleiz' ; bez' e oa en dornskrid, e-tal ar pezhioù barzhoni ezh, testennoù e yezh-plaen ez eus bet erlec'hiet outo barzhonegoù ; ha ret eo anzav, ne vern ar c'herse a c'hellfed kaout d'ar pezhioù-se, ez eo muioc'h 'unrizh' an oberenn nevez-mañ eget an hini gent, ez eo unvanoc'h he doare evel-se, pegen liesseurt bennak e vefe a-hend-all an awenadur hag eñ o klask e zavez ken en hengoun brezhon - "tantad ar Gourdadoù" - ken en hengoun ar Reter pellañ (Sina, Japan) ; ken en argeloù kevrinus ar c'har-tennoù-se bet arveret ergentaou gant ar Jipsianed, espar o c'henaoadur, hag a zegoue ennomp galloudezhioù dreistdiraez hon isemskiant.

Diwar bleustriñ an "Haïkaï" japanat hag hor c'hrennlavarioù - diwanet eus an hen driadennoù a wechall gozh - ez eo anadet perzh dibar ar barzhonegoù-mañ, o fetister, o c'herteri war an dispieg, par da hini ar mein engravet, o boullded, o galloud degounañ, ya, adarre, kar da hini ar mein garanet, pe d'an testennoù a veze dibunet diwar glevout gwechall ha na oa ket tonket dezho bezañ moulet war ar paper.

Ul "levr taol-skrivañ" eo al levr-mañ, unan a zalc'her bepred dindan an dorn, ha na c'heller ket skuizhañ outañ, a groger ennañ bepred en-dro, a zigorer hep klask pajenn ebet, dre ma n'eus pajenn ebet kennebeut a vefe disteroc'h eget eben, dre ma kaver e pep hini ar c'hrenngemennoù-se, ar furnez don-se a chomo garanet e 'keneñvor' hor pobl,- ken gwir ez eo en deus adkavet ar brezhon-mañ dianket e penn all an douar, war un dro gant yezh ar gour-dadoù, ur seurt galloud a oa bet kollet abaoe pell-meurbet, - ha kement-se en un doare ken natur ha ma wisk unan ur gwiskamant bet kavet gantañ e kambr e dad : gant souezh bras e verzer neuze ez eo bet kemmet dremm ar bed en-dro deomp en un taol, hag ez eo deuet pep tra da vezañ sklaer ha skeltr enni.

Iskisat tra soñjal ez eo deuet un harluad - a vije bet kredet e oa pellaet diouzhimp evit biken - da vezañ, dre n'ouzon pe dro-hud - unan eus derc'houezerion dilesañ hor sevenadur, unaneus hor brasañ barzhed vrezhonek bev.

Herve LANNDIERN

=====

Jean-Marc BIENVENU.- L'étonnant fondateur de Fontevraud : Robert D'Arbrissel.- Paris, Nouvelles Editions Latines, 1981.- In-8°, 192p., sk.

Robert d'Arbrissel, setu un anv ha na lavar netra d'ar Vrezhonek a hiziv na d'ar re all, - nemet, marteze, d'ur beleg pe d'ul lean bennak. Koulskoude e fin e vuhez e voe brudet-tre, ha breud

a savas diwar e benn. Goude-se avat ne voe mui rannet ger ebet war e zivoud, a-hervez, dre youl al leanezed m'en devoa pledet ganto, ken divoutin e oa bet gizioù tad-diazezer o urzh.

Ganet e voe Robert d'Arbrissel war-dro 1045, nepell diouzh Gwizhurie. Beleg e oa e dad, hep ma vije feuket e barrezianiz, ken boaz e oad ouzh an dra-se en amzer-hont. E Roazhon, e Kemper ez aed da eskob a dad da vab. Perak an dra-se ? Ken pouezus e oa levezon ha beli an eskibion hag ar veleion ma felle d'an Aotrouion derc'hel krog enno ha, zoken, envel anezho en o c'harg.

Kelennet e voe Roparz war-wel da vont da berson e-lec'h edo e dad, ha kaset e voe da Bariz da studiañ. Strivet en doa evit ma vije lakaet da eskob e Roazhon Silvestr a Werc'heg ("La Guerche"), e bennadur. Setu perak e voe dibabet gant an eskob d'e skoazellañ da velestrañ an eskopti. En e garg avat e kemmas e spered ha stourm a reas diwar neuze a-enep dimeziñ ar veleion. Eveljust, tennañ a reas kasoni warnañ. Ha goude marv e eskob e 1093 e rankas kuitaat ar vro : mont a reas da vezañ en Andevég ("Angers") ha chom eno e-pad daou vloavezh da studiañ.

Krog ennañ avat ar c'hoant-pinienn, e tec'has, gant ur c'henvreur, da vro goadek ar Roë, e-kichen Kraon. Paourentez ha pinienn a voe e lod eno, met kregiñ a reas ivez da brezeg tro-war-dro: un abostol kantreer ha truilhek. Buan-tre e teuas davetañ meur a hini hag e rankas, keuz ennañ, sevel ur manati evito, diouzh giz ar chalonied urzhiet, en abeg d'an abostolerezh. Heuliet e voe e skouer gant hini pe hini, evel Raoul de la Futaye a savas abati Neizh-Moualc'h e Sant-Sulpis-ar-C'hoad, e-kichen Roazhon.

Tennet e veze Roparz avat da gantren dre ar vro, heuliet gant meur a hini, paotred ha merc'hed, krog enno an hevelep uhelvennad. A-dra-sur ne oa

ket ar seurt meskerezh hep reiñ tro da reoù zo da c'hlabousaat ha da zroukprezeg. Taget e voe Roparzh gant Marbode, eskob Roazhon ha skrivagner lennek. Ne c'helle ket an traoù chom ha padout e-giz-se. Roparzh a strivas a-zevri-kaer da reiñ un tamm stabilded da vuhez e heulierion.

A-drugarez da zonezonoù ha da skoazell eskob Peizhav ('Poitiers') e voe debarzhet dezhañ un tamm domani e gevred Saumur, war ribl kleiz al Liger, e Fontebrald. Kaset e voe da benn savadurioù bras, met eilpennet war un dro spered an Taddiazezer. E gwirionez e teuas Fontebrald buan da vezañ un doare abati beneadat a leanezed: leanezed evit ar c'han, leanezed evit ar servij ; hag en o c'hichen, leanezed evit al liderezh ha leanezed evit al labour : e servij al leanezed, hag int dindan beli ha renerezh an abadez, koulz lavarout, - ar pezh na blije ket da bep hini. Degemeret e voe ar patrom-se avat gant abatioù all, - da skouer, hini Sant-Sulpis-ar-C'hoad, e-tal Roazhon.

Diskaret e voe tamm-ha-tamm huñvre Roparzh da zerc'hel d'ur baourentez razh. Pe abeg a voe d'an dra-se ? Donezonoù pinvidik ha dont en abati merc'hed tiegezhioù a noblañs, roueel zoken (dibabet he doa Dugez Vreizh, Ermengard, Roparzh da dad hec'h ene). Evelato e kendalc'has an abati da vont en-dro diouzh ar reizh-se betek 1789. Neuze e voe graet un toull-bac'h anezhañ, adal 1804 ; ha chom a reas un toull-bac'h betek 1963 : di e voe stlapet meur a vrogarour breizhat da vare an "Dieubidigezh", siwazh dezho !

Bez' ez eo bet savet allevr-mañ gant ur c'helenner Skol-Veur ; aozañ a reas e dezenn-doktolezh war an danvez-se, anavezet mat gantañ ; hag a-hed pajennoù e oberenn e varn, akuit, ar buhezskridoù savet diwar-benn Roparzh. Met n'eus ket ur skrivagner anezhañ ha ne oar ket danevellañ ; pouner eo e destenn, rouestlet ha deuet fall ar frazennoù meur

a dro, a-wechoù direizh . En oberenn-se ne gav ket al lenner alies ar blijadur-lenn, dellezet gant an danvez hag al labour-se end-eeun, ken talvoudus a-hend-all !

J.C.

=====

Abbé J. AUFFRET.- Saint-Coulomb des origines à nos jours.- Konkaven ('Cancale'), Foyer-Logement (e ti ar skrivagner), 1982. In-8°, 160p., sk.

Anavezet mat eo an Aotroù beleg Auffret gant lennerion IMBOURC'H. Meur a wech o deus bet tro da brizout e oberennoù embannet dindan an anv-pluenn: Erwan ar Menga ('Yves du Meinga'), oberennoù e galleg hag e brezhoneg. Rak daoust dezhañ bezañ bet ganet e Sant-Koulm, e dud, genidik eus Treger, ma ne faziomp ket, a gomze brezhoneg. E gwirionez e oa deuet en ur vro ma vevas ar brezhoneg enni betek an deket kantved, a-raok ma voe distrujet danvez ha sevenadur ar vro gant ar Vikinged. Chom a ra avat arroudennoù eus ar yezh en anvioù-lec'h.

Pa vez kontet istor ur barrez bennak e vez al lenner gwech dedennet gwech diseblant, o soñjal ez eo bet savet al labour-se hepken evit tud ar barrez hag ar c'horn-bro. N'eo ket an dra-se a c'hoarvez atav avat, pa oar ar skrivagner, evel amañ, gwelout an traoù eus an nec'h ha sevel e spered betek framm istor ar vro dre vras. Yen e chom ur skrid pa ne vez ket savet gant ar galon. Ar re hag a anavez Joseph Auffret, a oar, en a-raok, e vezo kristen ha breizhek ar mennozioù er pajennoù-se. N'eo ket hemañ unan eus ar re a vez o kuzhat o banniel en o chakod.

Gouzout a oar reiñ buhez d'ar fedoù kavet en dielloù. Derc'hel a ra kont an aozer eus kement diell a zo met anat eo ouzh peseurt kostezenn ez eo stag e galon.

Marteze e varno hini pe hini ez eo ar skriva-gner 'laudator temporis acti' ('meuler an amzer dremenet'). Hep tevel war ziaesterioù ar vuhez eus dec'h e pouez an aozer war levenez ar genvuhez, ur genvuhez damsteuziet bremañ, sur eo, diwar an doareoù gwisket gant ar sevenadur hiziv. Taolennañ a reer avat arvezioù mat ha fall ar genvuhez-se, ar wirionez e-giz m'emañ enta... Neuze... Pajennoù a gaver ivez diwar-benn temz-amzer ar c'horn-bro, e armerzh, gant sifroù ha taolenoù a vezo prizet gant ar re a blij dezho an doareoù skiantel ; hag ivez skeudennadurioù bourrus. Evel-se e kavo ar parrezriad, ar gweladenner, ar skiantour, boued talvoudus en oberenn.

J.C.

Yves PASSERAUD.- Une et (in)divisible ? - Kemper, Nature et Bretagne, 1982.- In-8°, 176p.

Setu c'hoazh ul levr diwar-benn damkaniezh ar gevreadelouriezh. ha daoust ma ne zesko ket kalz a dra d'ar re o deus studiet kudenn Vreizh a bell-zo e chomo dezho evelkent ar blijadur a welout e ro debron spered bepred d'ar re yaouank. Amañ avat n'emañ ket an danvez diwar-benn Breizh hec'h-unan met meret eo ar gudenn dre vras. N'eo ket souezhus goude-se ma vez sec'h ha kraz an destenn - ha re galvezel an dro-bluenn : ouzh yezh ur c'hevredadour hag ur politikour hon eus afer. Da grediñ eo

avat e vezo dedennet ar studierion... Hogen ar re all ?

Evelato, ma ne vez ket tizhet ar renerion e chomo al labour-mañ ul labour damkanour, ul labour huñvreer. Chom a raio gantañ avat un dellid, hini dedennañ an evezh war un danvez studiet abaoe ugent pe, zoken, hanter-kant vloaz zo... Ur gudenn a zo bepred diouzh ar mare hiziv, dre ma n'eus bet graet kammed ebet war-raok e Bro-C'hall evit kas da wir an damkaniezh-se. Ar strollad nevez a zo krog er stur e Pariz hiziv n'eus gantañ nemet promesaoù. Ret e vezo gortoz meur a vloaz a-raok gelout priziañ an disoc'hoù. Skoazellañ a raio al levr-mañ ar re a blij dezho ar gudenn-se da verzout gwelloc'h arvez pe arvez anezhi.

J.C.

=====
Michel RENOARD.- Nouveau guide de Bretagne.- Roazhon, Ed. Ouest-France, 1982.- In-8°, 400p., sk. 80 lur.

Moulet ez eus bet e ti-embann OUEST-FRANCE, savet gant M. Renouard, ur Guide de Bretagne. Setu hiziv ul levr nevez, fetisoc'h ha bravoc'h, diwar-benn an hevelep danvez, nemet ez eo bet nevesaet ha dalc'het 'up to date' (da skouer, tangwall Ti ar Sevenadur e Brest e miz Du 1981) ; un dra vat ha da veuliñ : kel a zo en oberenn eus Breizh a-bezh, gant bro-Naoned.

Ur rakskrid a ugent pajenn a zispleg ragistor hag istor Breizh, a lavar ivez ur ger deuet mat diwar-benn ar brezhoneg, ur ger all diwar-benn an arz e Breizh. Goude-se e pleder gant an anvioù-lec'h, hervez urzh al lizherenneg : al lec'h, e istor, e vraventez, h.a. N'eus ket aze ur skrid

sec'h, pounner da lenn. Adwelet eo bet ar skrid gant tud a vicher. Marteze, eveljust, e c'hello ur pismiger kavout ur faziig bennak; pelec'h avat emañ ar skrivagner ha na vije bet biskoazh ur mank pe ur fazi da damall dezhañ ? Krediñ a reomp e c'hell al lenner fiziout en destenn-se.

Ouzhpenn-se ez eo skeudennaouet mat-tre al levr gant luc'hskeudenoù livek dibabet mat : ar vro, savadurioù, ilizoù, kroazioù h.a. E gwirionez ne vez ket gwerzhet ker al levrenn-mañ, diouzh he zalvoudegezh. N'ouzomp ket ha savet eo bet evit touristed ; met, a-dra-sur, o deus ar Vrezhoned o-unan ezhomm da zeskiñ meur a dra diwar-benn o bro, he braventez, he finvidigezhioù arzel, hec'h amzer dremenet h.a. An ti-embann OUEST-FRANCE a ra, gant e zastumadennoù-arz dreist-holl, ul labourdedennus-tre, o lakaat etre daouarn Breizhiz binvioù aes evit anavezout, kompren gwelloc'h ha karout mui-ouzh-mui o bro enta. Chañs vat d'an oberenn !

J.C.

=====
Henri QUEFFELEC.- De par les sept mers.-
Paris, Presses de la Cité, 1982.- In-8°,
208p., sk.

Puilh eo oberenn H. Kefeleg, ha zoken, div pe deir gwech a-hed ar bloaz e vez embannet ur romant bennak gantañ. E deroù 1982 ez eo bet embannet gantañ "De par les sept mers". E gwirionez n'eus ket ur romant eus an oberenn-mañ, un dastumad danevelloù, ne lavaran ket, deuet mat a-hend-all, pep hini diwar-benn un danvez hag a sell a bell pe a dost, ouzh ar mor, pe gentoc'h, buhez tud a vor. D'hor meno, plijusoc'h eo lenn an oberenn-se eget romantoù ar skrivagner, ken fonnus e daolennadurioù eus an darvoudoù pe eus tro-spered an tu-

dennoù, un dro-spered lakaet war gont ar re-se diouzh faltazi ar skrivagner. Amañ avat ez eo skañv an danevell, aes, bev-buhezek, o terc'hel war evezh spered al lenner, oc'h ober dezhañ gortoz, gredus, dibenn an istor. Evel-se emañ an dek danevell : kemeret eo an danvez pe an testennoù diouzh fedoù gwirion ; nemet ne guzh ket ar skrivagner en deus kempennet tra pe dra evit sevel un oberenn lennek. Gwell a se : rak plijus eo da lenn.

Livet mat eo ar vuhez war vor, ar gweledvaoù hag ar bagoù, dreist-holl avat ar bagoù-dre-lien, an darvoudoù kriz. Anavezet mat eo ar vuhez-se gant an aozer. Ur Brestad eo H. Kefeleg, hoallet gant ar mor. Alies en deus bevet war an aod pe en inizi Breizh ; savet eo war vourzh ar bigi-pesketa pe al listri-kenwerzh ; dre se ivez ne vez ket faziet pa zezrevell dre ar munud buhez ar vartoloded ha, d'hor meno, ne vo ket touellet al lenner a glask ur skeudenn feal eus buhez an dud-a-vor end-eeun.

J.C.

=====
Moulet gant ar gelaouenn
CPAPP : 50 015

Ar Renner Y.Ollivier



